




**DIAGNOSTIK  
STAD AR BREZHONEG  
E BRO GWENGAMP  
DOARE NEVEZET 2004-2009**

**POL STUDI HA DIORREN**  
ARSELLVA IMPLIJ AR YEZHOU  
2010

# Digoradur

*Ur steuñv hollek da ziorren ar brezhoneg, Brezhoneg 2015, a oa bet savet gant an Ofis e 2003. Diazezet e oa war stad wirion ar yezh a-benn ober kinnigoù uhelek met fetis evit suraat he dazont. Kement ha kinnig ur steuñv pleustrek da vat e oa bet divizet e zisplegañ dre vro<sup>1</sup>, anezhi ur vent dereat evit tostaat ouzh gwirvoud an dachenn.*

*Daou deul a oa bet savet evit pep hini eus an 29 bro zo e Breizh : un diagnostik ha palioù diorren. Kavout a ra deomp eo deuet ar mare da nevezñ ar studiadenn bet savet neuze ha d'ober bilañs an emdroadurioù deuet abaoe. Ra sikouro an diagnostik nevez-mañ, savet diwar an holl roadennoù hon eus dastumet hag e darempred gant oberourien pep tachenn, da sevel ur politikerezh yezh efedus.*



*Lena Louarn,  
Prezidantez Ofis ar Brezhoneg*

---

<sup>1</sup> Diwar ur genstaged douaroniel, armerzhel, sokial ha/pe sevenadurel eo treset ar broioù bet termenet gant al lezenn “Voynet“ e 1999. Ar broioù-se an hini eo a implijer er steuñv-mañ.

# Taolenn

<b>SAVIAD BRO GWENGAMP</b> .....	<b>4</b>
Sifroù pennañ bro Gwengamp .....	5
Dibarderioù bro Gwengamp .....	6
Brezhonegerien bro Gwengamp .....	6
<b>AR BREZHONEG EN DESKADUREZH</b> .....	<b>7</b>
<b>Kelenn brezhoneg er skol</b> .....	<b>9</b>
Kelenn divyezhek .....	9
Dasparzh ar c'hinnig .....	9
Niver a zeskidi er c'helell divyezhek .....	12
Stadegoù ar c'helell divyezhek .....	17
Kelenn brezhoneg .....	21
An tañva brezhoneg er c'hentañ derez .....	21
Ar c'helell brezhoneg en eil derez .....	21
<b>An deskadurezh uhel</b> .....	<b>24</b>
<b>Ar c'helell d'an oadourien</b> .....	<b>26</b>
<b>PREDER AR BED FORAN</b> .....	<b>30</b>
<b>Politikerezh yezh an departamant</b> .....	<b>32</b>
Obererezh an departamant .....	32
Budjed KD 22 evit ar yezh .....	32
<b>Ar vro</b> .....	<b>34</b>
Kevrat bro Gwengamp .....	34
<b>Oberoù ar strollegezhioù lec'hel</b> .....	<b>35</b>
<i>Ya d'ar brezhoneg</i> .....	35
<b>OBER GANT AR BREZHONEG ER GEVREDIGEZH</b> .....	<b>38</b>
<b>Treuzkas ar yezh</b> .....	<b>38</b>
Servijoù d'an dud .....	38
Bed ar vugaligoù .....	38
<b>Dudi</b> .....	<b>38</b>
Dudi evit ar vugale .....	38
Dudi evit an oadourien .....	41
<b>Buhez speredel</b> .....	<b>41</b>
<b>An embann</b> .....	<b>42</b>
<b>Ar mediaoù</b> .....	<b>42</b>
Ar c'hazetennoù .....	42
Er skinwel .....	42
Er skingomz .....	42
<b>Marc'had al labour e brezhoneg</b> .....	<b>44</b>
<b>An armerzh</b> .....	<b>45</b>
<b>KLOZADUR</b> .....	<b>49</b>
<b>Taolenn sintetek</b> .....	<b>51</b>
<b>STAGADENNOÙ</b> .....	<b>53</b>
<b>LEVRLENNADUR</b> .....	<b>55</b>
<b>MAMMENNOÙ</b> .....	<b>55</b>

# Saviad bro Gwengamp

Kinnig bro Gwengamp - 2009






## Sifroù pennañ bro Gwengamp

Niver a gumunioù	65
Poblañs hollek e 2006	76 126
Emdroadur ar boblañs etre 1999 ha 2006	+5,5%
Gorread	1 113 km <sup>2</sup>
Stankted ar boblañs	68 ann./km <sup>2</sup>

*Emdroadur poblañs ar c'humunioù etre 1999 ha 2006*



# Dibarderioù bro Gwengamp

Gant 68 annezad dre km<sup>2</sup> ez eo bro Gwengamp unan eus ar broioù m'eo an izelañ stankted ar boblañs. Kresk-digresk zo er vro abaoe 40 vloaz. Ur c'hresk a oa bet etre 1999 ha 2006 memes tra (+0,7% bep bloaz). Ur c'hresk par da hini Treger-ha-Goueloù pe da hini bro Sant-Brieg. Chom a ra un tamm dindan keidenn Breizh (+0,9%) avat.

Paneve ur gumun war an aod (Plouha) eo troet ar vro war an diabarzh. E gennad al labour-douar ez eus un hanter muioc'h a implijoù er vro eget e rannvro Breizh dre vras. **Gwengamp Kumuniezh** eo pol pennañ servijoù ar vro. Poloù all zo tro-dro da Vear pe da Gastellaodren-Plagad. **Levezonet eo ar reter gant bro Sant-Brieg** : 14% eus tud oberiant bro Gwengamp a labour er vro-se.

Hervez brasjedadennoù senario uhel an imbourc'herezh bet savet gant an EBSSA e c'hellfe bezañ **war-dro 78 000 a annezidi e bro Gwengamp e 2015** (+0,3% a gresk bloaziek) hag ouzhpenn 84 000 annezad e 2030 (+0,5% a gresk bloaziek), ar pezh a dalvezfe ur c'hresk izeloc'h eget er rannvro c'hoazh.

## Brezhonegerien bro Gwengamp

Da-geñver niveradeg 1999 en doa savet an EBSSA un enklask anvet *Étude de l'histoire familiale*. Gantañ en doa kenlabouret an Ofis evit dielfennañ an disoc'hoù. En enklask-se e oa goulennoù a denne d'an ober gant ar yezhoù ha drezo e oa bet dastumet roadennoù a c'haller implijout da briziañ an niver a vrezhonegerien deuet d'o oad gour, dre zepartamant. Kadarnaet eo bet gant ar roadennoù-se e kosha brezhonegerien kornôg Breizh (ha re bro Gwengamp neuze).

Diwar ar sifroù-se ha krugell an oadoù, diwar sifroù ar c'helenn divyezhek ha diouzh dibarderioù pep bro ez eus tu da vrasjediñ an niver a vrezhonegerien e pep kornad. E-se e c'hellomp embann e oa etre 15 000 ha 17 000 brezhoneger o chom e bro Gwengamp e 1999, da lavaret eo war-dro 22% eus ar boblañs (pa save ar feur-se da 6,7% e Breizh a-bezh).

Da-heul e c'hellomp jediñ ivez **e vefe war-dro 12 000 brezhoneger e bro Gwengamp e 2009**, da lavaret eo war-dro 17% eus poblañs ar vro (pa savfe feur Breizh da 4,7% dre-vras). **An trede bro vrezhonekañ e Breizh eo bro Gwengamp**, goude bro Kornôg Kreiz-Breizh (22%) ha bro Treger-ha-Goueloù (20,6%). **War-dro 5 000 brezhoneger a vefe aet d'an Anaon** etre 1999 ha 2009.

### An ezhomm roadennoù


Studiet eo bet an treuzkas er familhoù gant enklask an EBSSA e 1999. Dastumet e oa bet roadennoù e pep departamant war ar yezh bet desket gant an dud pa oant yaouank, an implij a raent eus ar yezh da vare an enklask hag ar yezh treuzkaset ganto d'o bugale da 5 bloaz. Ne c'haller ket dielfennañ ar roadennoù-se er broioù abalamour m'eo re vihan ar standilhon implijet. Met gallout a reer lakaat an tuadurioù zo bet merzet da dalvezout evit ar vro memes tra. Kadarnaet o deus ar roadennoù-se ar giladenn a weler er gevredigezh evit treuzkas ar brezhoneg er familhoù. Abalamour d'un torr e chadenn deskiñ ar yezh etre ar vugale hag o zud ez eo digresket an implij anezhi a-hed ar c'hantved diwezhañ. Abaoe ar bloavezhioù 1980 e vez komzet galleg ouzh ar vugale gant an holl dud pe dost. Kadarnaet eo bet an tuadur-se gant disoc'hoù sontadeg TMO-Fañch Broudig sevenet e Kerzu 2007.

Splann eo ez eus ezhomm bras da gaout roadennoù resisoc'h war ar yezh komzet ouzh ar re vihan evit muzuliañ levezon an oberoù graet evit kas ar yezh war-raok, levezon ar c'helenn d'an dud deuet da skouer war ar yezh komzet er familhoù. N'eus nemet o sevel niveradeg ar yezherien dre gumun e c'hallimp kaout seurt roadennoù.



# Ar brezhoneg en deskadurezh

Ar c'heleñn brezhoneg – Bloavezh-skol 2009/2010



Abaoe pell e vez kelennet en div yezh er vro (1981) met n'eus bet krouet lec'hiad divyezhek nevez ebet etre 1998 ha 2005 ha n'eo ket cheñchet kalz tres ar vro abaoe an diagnostik diwezhañ (2003).

E 13 kumun e kaver un doare da nebeutañ da zeskiñ ar yezh. Ur bempvedenn eus ar c'humunioù ez eont d'ober hepken : izeloc'h eo ar feur-se eget e bro Treger-ha-Goueloù (ur c'hard) pe e bro Brest (un hanter). Stabil a-walc'h eo, pa oa 14 kumun gant ur c'hinnig e 2003.

**Diwar ar 47 kumun zo ur skol enno, 7 anezho a zegemer ul lec'hiad kelenn divyezhek.** Evit an eil derez, diwar an 9 c'humun a zegemer ur skol eil derez, 6 a ginnig kentelioù brezhoneg. N'eo ket aozet tamm ebet an tañva brezhoneg e skolioù ar c'hentañ derez avat, er c'hontrol diouzh ar pezh zo bet graet e broioù Penn-ar-Bed (war atiz an departamant).

Chom a ra 34 c'humun c'hoazh, da lavaret eo tost an tri c'hard, enno ur skol da nebeutañ, ma n'hall ket ar vugale deskiñ brezhoneg e mod ebet.

E distro-skol 2009 e oa **920 skoliad**<sup>2</sup> oc'h heuliañ kentelioù brezhoneg pe e brezhoneg eus ar skol-vamm d'al lise. Mont a reont d'ober tost da 6,1 % eus ar boblañs-skol (da 5,5% e save ar feur-se e 2003/2004). An 9<sup>vet</sup> bro eo e Breizh pell war-lerc'h bro Treger-ha-Goueloù (1 315) pe bro Montroulez da skouer (3 350).

Estregeto e konter **145 den** a zesk brezhoneg (115 e oant e 2003, da lavaret +26% a zeskidi ouzhpenn e-keñver distro-skol 2003) ha war-dro 150 stajiad.

<sup>2</sup> 623 en hentadoù divyezhek ha 297 skoliad gant kentelioù yezh en eil derez.

**War-dro 1 225 desker a oa er vro e 2009 pa oant 1 125 e 2004** : kresket eo an niver (+8% a zeskiñ ouzhpenn e-keñver 2004), met emañ ar vro **e-touez ar broioù gant ar c'hresk bihanañ zo e Breizh**. Muioc'h a skolidi divyezhek zo, met nebeutoc'h a skolidi gant kentelioù en eil derez. Evel e Breizh dre vras ez eus muioc'h a lañs er vro gant ar c'helenn divyezhek eget gant an doareoù all da zeskiñ.

Kelenn da 1 225 den ne dalvez ket e vint holl brezhonegerien e dibenn ar red-deskiñ. Gallout a reer jediñ an niver a vrezhonegerien ouzhpenn a vez stummet bep bloaz: 35 skolajiad bennak en em gav e trede klas lec'hiadoù divyezhek ar vro, 8 lisead termen er c'hentelioù Yezh Vev ,30 den bennak ouzhpenn a dizh liveoù uhelañ ar c'hentelioù-noz, 10 den bennak a vez stummet en UCO. Setu, **war-dro 75 brezhoneger bennak a vez stummet** tra ma varv 500 yezher bennak bep bloaz. Gant ar geñveriadenn-se e sav feur adneveziñ poblañs brezhonegerien da 1 evit 7 pe 1 evit 8, da lavaret eo **e stummer 1 brezhoneger nevez evit 7 pe 8 a ya d'an Anaon**. Heñvel eo ar feur-se ouzh hini bro Gerne met un tamm izeloc'h eget hini bro Brest pe bro Montroulez ma brasjeder ur brezhoneger stummet evit 5 a ya d'an Anaon.




# Kelenn brezhoneg er skol


## Kelenn divyezhek

➤ Dasparzh ar c'hinnig

## Kinnig kelenn divyezhek er c'hentañ derez – Distro-skol 2003



## Distro-skol 2009



Gwelloc'h eo deuet ar c'hinnig da vezañ e gwalarn ar vro, gant div skol ouzhpenn e-keñver 2003. Met treut eo chomet e su ar vro gant ul lec'h hepken e Boulvriag ha n'eus **netra er reter** c'hoazh. Un tamm dihun a verzer abaoe 2005 memes tra. Met dont a ra splann c'hoazh an digempouez etre ar reter hag ar c'hornôg. Ur skol ouzhpenn a zlefe bezañ war ar gartenn, peogwir e oa bet digoret unan gant Diwan er Chapel-Nevez. Met ranket he deus ar skol-se dilojañ da Blounevez-Moedeg.


Bihan eo ar vro ha tost 30 vloaz zo ez eus eus ar skolioù divyezhek enni : kempouesoc'h ha stankoc'h e c'hallfe bezañ o rouedad. **Div gumuniezh-kumunioù a chom dibourvez c'hoazh** : hini Lannolon-Plouha (ur raktres publik sammet gant an ti-kêr zo war ar stern a-benn distro-skol 2010) hag al Leñv Kumuniezh (K.K. Kastellaodren-Plagad). **Treut e chom ar c'hinnig e su an hent-tizh.**

Krog eo ar vro da zihuniñ a-drugarez da stourmoù ar gerent e Bear e 2007 hag e Pleuzal e 2009. Gwall vresk e chomo an traoù avat e-keit ha ma ne vo ket kenurzhiet ha programmet digeriñ lec'hiadoù nevez evit ar bloavezhioù da zont.

**Ledanaet eo** bet ar c'hinnig er c'hentañ derez gant **3 lec'hiad nevez e lec'hioù ma ne oa kinnig ebet e 2003**: e K.K. Boulvriag e 2005, e K.K. Bro Bear e 2007 hag e K.K. an Trev e 2009. Un tamm nebeutoc'h eo eget e bro Treger-ha-Goueloù (4 lec'hiad nevez) ha kalz nebeutoc'h eget bro Brest (10 lec'hiad), ar vro ma'z eus bet digoret ar muiañ a skolioù etre 2004 ha 2009.

N'eo ket kresket kinnig ar c'hentañ derez e kêr vrasañ ar vro (Gwengamp), nag er gumuniezh-kumunioù m'emañ ivez an eil kêr pobleañ er vro, Plouvagor.

### Kinnig kelenn divyezhek en eil derez – Distro-skol 2009



E tri skolaj ez eus ur c'helenn divyezhek pa ne oa nemet 2 e 2003 : en eil derez e **kendalc'h ar c'helenn divyezhek prevez e Gwengamp** er skolaj **abaoe distro-skol 2007**.



Ned a ket ar c'helenn divyezhek betek al lise c'hoazh : **e Breizh-Izel n'eus nemet e bro Gwengamp hag e bro Montroulez, ma n'haller ket deskiñ brezhoneg el lise.**

### ➤ Niver a zeskidi er c'helenn divyezhek


Gant **623 skoliad divyezhek** e distro-skol 2009 emañ ar vro en deket plas e Breizh (en 21<sup>vet</sup> plas emañ e-keñver ar boblañs skol hollek), war lec'h bro Kornôg Kreiz-Breizh, evel e 2004. **Tost div wech nebeutoc'h a zeskidi zo eget e bro Treger-ha-Goueloù koulskoude.**

Er skolioù **publik** emañ an darn vrasañ (58 %) eus skolidi divyezhek **ar c'hentañ derez**. **Kresket eo pouez** ar c'helenn publik e-keñver 2004 (pa save da 50%), gant lec'hioù nevez Bear ha Pleuzal da skouer.

Ar muiañ-niver zo e **Diwan** avat, gant skolaj Diwan Plijidi a zegemer skolajidi eus lec'h all ivez.


**Dont a ra kresk ar c'helenn divyezhek eus an eil derez abaoe 2007** hag a-drugarez d'ar skolaj Diwan eo (kresk bras en 2 vloaz diwezhañ : +41%). Digoret e oa bet un hentad divyezhek er skolaj prevez e Gwengamp e 2007 ivez. Un nebeud bugale eus Pabu (lec'hiad publik) a gendalc'h bep bloaz en hentenn divyezhek ar skolaj prevez e Gwengamp.

*An niver a skolidi divyezhek – Distro-skol 2009*



*Er-maez eus lec'hiadoù Gwengamp (pol pennañ ar vro) ha Pabu (digoret e 1991) ez eo bihan a-walc'h al lec'hiadoù zo er vro. Staliet eo hentadoù Benac'h ha Louergad e skolioù bihan : n'int ket emdroet nemeur en dek vloaz diwezhañ ha ne c'hallint ket kreskiñ kalz pelloc'h. Muioc'h a "zanvez" zo e Bear hag a zo gant tremen 50 skoliad goude daou vloaz hepken. Bihan eo hentad Boulvriag c'hoazh goude 4 bloaz. Ret e vo digeriñ lec'hiadoù divyezhek er c'humunioù pobletañ Plouagor, Plouha, Pleuloc'h.*


An niver a skolidi divyezhek hag en deskadurezh dre-vras. Skol-vamm betek lise.



Kreskiñ dizehan a ra ar c'helenn divyezhek p'eo chomet stabil an niver a zeskidi dre-vras. Buanoc'h e kresk abaoe 2007 gant an eil derez : berzh skolaj Diwan Plijidi ha digoradur an hentad divyezhek er skolaj prevez.

Dilañs zo er vro pa geñverier gant Breizh a-bezh, daoust ma 'z eo un tamm gwelloc'h abaoe 2004 gant an 3 skol zo bet digoret. **Izeloc'h** eo feur emdreiñ ar c'helenn divyezhek **er vro** etre 1999 ha 2009 **eget e Breizh dre vras** : war-dro +5% a gresk keitat bep bloaz er vro e-skoaz +9% e Breizh. Brasoc'h eo an diforc'h etre 1999 ha 2004 c'hoazh pa oa tro-dro da 4% hepken ar feur emdreiñ er vro hag 11% e Breizh. Etre 2004 ha 2009 eo tostoc'h feur emdreiñ ar vro (6,1%) da hini Breizh (6,6 %) rak tuet eo bet ar c'hresk bloaziek da c'horrekaat e Breizh a-bezh. Pa ne gontet ket sifroù an eil derez, gant re skolaj Diwan Plijidi dreist-holl, e chom feur emdreiñ ar c'hentañ derez etre 2004 ha 2009 dindan keidenn Breizh a-bezh.


An niver a skolidi divyezhek er c'hentañ derez



E-touez ar broioù o deus kresket an nebeutañ en dek vloaz diwezhañ emañ bro Gwengamp. Ned a ket ken fonnus an emdroadur hag er broioù all.


Krouet ez eus bet lec'hiadoù nevez abaoe 2003; ar pezh a ra an diforc'h gant ar broioù all eo an diouer a lañs zo gant lec'hiadoù pennañ ar vro : ezhomm zo digeriñ lec'hiadoù all e Gwengamp (evit ar c'helenn publik) hag e kumunioù all er gumuniezh kumunioù (evit Diwan hag ar c'helenn prevez).

An niver a skolidi divyezhek er c'hentañ derez




Pa greske an niver a skolidi divyezhek e kumunioù all eo chomet stabil e **kêr Wengamp** e-kerzh an dek vloaz diwezhañ. **Muioc'h a skolidi a oa e 2004**, da vare an diagnostik diwezhañ, eget e 2009 zoken. Abaoe pell emañ staliet ar c'heleñn divyezhek eno koulskoude (skol Diwan krouet e 1981, skol brevez e 1994), met n'eus ket bet digoret lec'hiadoù nevez abaoe ouzhpenn 15 vloaz. **Dibaseet eo bet Gwengamp gant Sant-Brieg** (ma'z eus bet roet ul lañs nevez d'ar c'heleñn divyezhek gant al lec'hiad publik digoret e 2000). Gant krommenn Landerne e weler mat petra a dalvez ur politikerezh diorren. Dindan 5 bloaz eo bet daougementet an niver a skolidi divyezhek : klokaet e oa bet ar c'hinnig gant ur skol brevez e 2005 ha digoret un eil lec'hiad publik e 2006.

*An niver a skolidi divyezhek er c'hentañ derez*



*Kresket eo pouez ar c'hlasoù publik er c'hentañ derez etre 2003 ha 2009 p'eo digresket hini Diwan dre ma n'eus nemet ur skol. Ne vijet ket bet ken bras m'he dije gallet skol ar Chapel-Nevez chom er vro. A-live emañ Diwan gant ar skolioù katolik e 2009. 9 foent zo bet kollet gant Diwan en ur ober 6 vloaz.*

*Dasparzh ar skolidi divyezhek hervez al live en tri hentad – Distro-skol 2009*



**Ouzhpenn an hanter eus skolidi divyezhek ar skolioù publik zo er skol-vamm**, diwar an daou lec'hiad nevez-digoret Derc'hel a raint da greskiñ er bloavezhioù a




zeu neuze, ezhomm zo prientiñ ar c'hendalc'h en eil derez evito : n'ed a ket al lodenn vrasañ eus ar skolidi-se d'an hentad divyezhek zo e Gwengamp.

Er c'hontrol eo **bras pouez an eil derez e Diwan** abalamour da skolaj Plijidi ha bihan eo hini ar c'hentañ derez (ur skol hepken). Ne c'hall ket ar c'hentañ derez boueta ur c'hresk.

Kompesoc'h eo dasparzh ar skolidi en hentad katolik. Ar c'hendalc'h er skolaj bet lakaet war-sav 2 vloaz zo a ya mat en-dro, met ezhomm a vefe da ledanaat ar c'hinnig er vro (2 lec'hiad er c'hentañ derez hepken).

*An niver a skolidi divyezhek er c'hentañ derez*




Ned a ket war-raok ken ar **skol Diwan nemeti zo er vro**. Ar memes niver a skolidi zo e 2009 ha 10 vloaz zo ha **tuet eo an niver-se da ziskenn abaoe 2003** zoken. Ezhomm bras zo da zigeriñ un eil skol er vro evit ma'z afe Diwan war gresk en-dro. **Abaoe distro-skol 2008**, bloavezh m'eo aet kuit eil skol Diwan ar vro, **ez eus kement a skolidi divyezhek er c'helenn prevez hag e Diwan**.

Muioc'h a lañs zo gant an hentad publik er vro abalamour dreist-holl d'al lec'hiadoù nevez krouet e Bear (50 skoliad goude daou vloaz) ha Pleuzal e distro-skol 2009.

Daoust d'ur skol bezañ bet digoret e 2005 (e Boulvriag) n'eus ket kalz a lañs gant ar c'helenn prevez er vro etre 2004 ha 2009. Un diouer a emvrudañ zo e skol brevez Boulvriag.




## An niver a skolidi en eil derez



**Gwan-kenañ** eo an eil derez **publik**, krouet e 1997 koulskoude. Ezhomm zo da zigeriñ ul lec'hiad publik er c'hentañ derez e Gwengamp pe e Gwengamp Kumuniezh evit magañ ar skolaj. **Muioc'h a skolajidi zo er c'helenn prevez** a oa bet krouet 2 vloaz zo koulskoude. Abaoe pell e c'houlenne kerent skolidi Benac'h digant ar Rektorelezh digeriñ un hentad divyezhek er skolaj. Dre ma oa bet nac'het dezho e 2005 ez a un toullad skolidi eus ar skolioù-se da skolaj Diwan Plijidi.


### ➤ Stadegoù ar c'helenn divyezhek

#### Kentañ derez




**Dindan 10 vloaz ez eus bet kollet tost 4 foent e-keñver Treger-ha-Goueloù pa oa an div gumuniezh kumunioù a-live an eil gant eben e 1999. Heñvel eo emdroadur bro Gwengamp ouzh hini an departamant pa rankfe bezañ ul lusker (an 3e bro eo e Breizh evit a sell ouzh dregantad ar vrezhonegerien).**

Feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez hervez ar framm etrekumunel – Bloavezh-skol 2009/2010



An daou framm m'emañ staliet ar c'helenn divyezhek abaoe ar pellañ zo er penn a-raok. K.K. Bro Benac'h eo ar framm etrekumunel eus Breizh ma kaver an dregantad uhelañ a skolidi divyezhek gant K.K. Beg ar C'hra ha K.K. Kreiz Treger. Bihan eo c'hoazh levezon ar c'helenn divyezhek en div gumuniezh-kumunioù m'eo bet nevez-staliet ar c'hinnig : K.K. Bear ha K.K. an Trev. Met kregiñ a reer da verzout an efed memes tra. Bihan eo pouez ar c'helenn divyezhek e K.K. Boulvriag, kroget e 2005, gant ul lec'hiad divyezhek enni hepken ha nebeut a lañs gantañ.

*Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez er frammoù etrekumunel*




E-keñver Breizh a-bezh emañ **Gwengamp Kumuniezh** e-touez ar frammoù etrekumunel m'emañ pouez ar c'helenn divyezhek **en e uhelañ** (dirak Tolpad-Kêrioù Lannuon-Treger pe K.K. Bro Landerne-Daoulaz da skouer) met evit adkavout ul lusk kreskiñ e vo ezhomm digeriñ lec'hiadoù nevez (stabil eo pouez ar c'helenn divyezhek e Gwengamp Kumuniezh hag e K.K. Bro Benac'h ivez, anezho 2 DPKE ma n'eus bet digoret netra etre 2004 ha 2009). Ezhomm zo eus un eil lec'hiad publik e Gwengamp Kumuniezh rak ne gresk ket lec'hiad publik Pabu ken : ar memes feur zo e 2009 hag a oa e 1999 da lavaret war-dro un drederenn eus ar skolidi zo en hentad divyezhek.

N'eus kumun ebet er vro ma vefe ar muianiver gant ar skolidi divyezhek evel ma'z eus unan e bro Treger-ha-Goueloù c'hoazh (Plounevez-Moedeg gant 70% a skolidi divyezhek er c'hentañ derez da skouer).

Peadra zo da labourat war raktresoù er c'hornadoù zo dibourvez evit ar mare (war ar stern ez eus ur raktres e Plouha kaset war-raok gant an ti-kêr). Ma vez kaset da benn e roio tu da gempouezañ ar c'hinnig er vro.


Skolidi kentañ derez ar vro- distro-skol 2008



Ur pouez bras zo gant ar c’helenn divyezhek e **Pabu** hag e **Benac’h** : e-touez lec’hiadoù kentañ Breizh eman an 2 lec’hiad-se (ouzhpenn ur c’hard eus poblañs ar skolidi er c’helenn divyezhek). Met reiñ a ra ar gartenn-se an tu da briziañ pegen diaes eo stad ar yezh gant ur c’hinnig bihan a-benn ar fin : kumunioù bras zo hep kinnig ebet c’hoazh (Plouha, Pontrev, Lannolon, pe Plouvagoar c’hoazh, eil kumun ar vro evit ar poblañs).

Da-geñver savidigezh “Brezhoneg 2015 – Steuñv hollek da ziorren ar brezhoneg gant an Ofis” e oa bet termenet palioù bloaziek dre vro evit ma vefe 25 000 skoliad divyezhek e Breizh a-benn 2015. Un tamm dale zo bet tapet gant an hollad e Breizh met brasoc’h eo an dale bet tapet gant bro Gwengamp.

*Emdroadurioù keñveriet an niver gwir a skolidi divyezhek hag an niver lakaet da bal*



*Diouzhtu ez eus bet un troc'h diouzh ar pal bet lakaet hag e 2009 ez eus un dilañs -25% e-keñver ar pezh a vije bet ezhomm. Kalz brasoc'h eo an troc'h diouzh ma'z eo e e bro Brest (-8%) pe e bro Treger-ha-Goueloù (-13%).*

Gant an dale tapet e-keñver ar palioù e c'hallfed krediñ e vije diaes tizhout ar pal a 1 300 skoliad divyezhek a-benn 2015. Met an tamm dihun merzet abaoe 2007 a ziskouez n'eo ket dibosupl tamm ebet : trawalc'h e vefe derc'hel gant ur c'hresk bloaziek par da geidenn ar vro etre 2007 ha 2009 pe un tamm brasoc'h (etre +10 ha +15%) evit kaout 1 300 skoliad a-benn 2015. Evit en ober ez eus ezhomm digeriñ skolioù nevez bep bloaz.

## Kelenn brezhoneg

### ➤ An tañva brezhoneg er c'hentañ derez

N'eus ket eus an doare kelenn-mañ er vro. En Aodoù-an-Arvor n'eus nemet e bro Kallag e vez roet d'ar vugale un tañva eus ar brezhoneg gant ur skolaer-bale kaset gant an Ensellerezh-Akademiezh. Evit kempouezañ an diouer eus ar seurt kelennadurezh n'en deus ket aozet departamant Aodoù-an-Arvor un tañva er skolioù evel e Penn-ar-Bed. War-dro 9% eus skolidi kentañ derez bro Brest a vez kizidikaet ouzh ar brezhoneg dre stignad departamant Penn-ar-Bed (a gemer war e chouk an hanter eus ar frejoù kelenn, an hanter all a vez war goust ar chumunioù).


Evit ar skolidi n'int ket skoliataet en hentadoù divyezhek (da lavaret eo 95,5% eus bugale bro Gwengamp da skouer) eo an tañva er c'hentañ derez un doare talvoudus da gaout un tamm darempred gant ar yezh koulskoude. Ha skoazellañ a ra ar c'hentelioù en eil derez, pa c'hall reiñ c'hoant d'ar vugale da genderc'hel gant ar yezh er skolaj. Ouzhpenn-se e laka war wel diagnostik bro Brest hag a denn splet eus politikerezh Kuzul-departamant Penn-ar-Bed n'eus ket kevezerezh etre ar c'helenn divyezhek hag an tañva. Respont a reont da ezhommoù disheñvel.

### ➤ Ar c'helenn brezhoneg en eil derez

Kentelioù brezhoneg a vez kinniget en eil derez. Er skolaj e c'hell bezañ graet dindan stumm abadennoù tañva adalek ar 6<sup>vet</sup> betek an 3<sup>e</sup> klas (etre 1 eurvezh ha 2 eurvezh bep sizhun, ma roer un tamm deskamant war yezh ha sevenadur Breizh). Er 4<sup>e</sup> hag en 3<sup>e</sup> klas e c'hall ivez bezañ kinniget evel Yezh Vev pe evel danvez dibab : etre 2 ha 3 eurvezh bep sizhun.

Kinniget e vez kentelioù brezhoneg en **holl skolajoù publik** war-bouez hini Kastellaodren.

Diwar ar skolioù prevez eus ar vro ma veze kinniget kentelioù brezhoneg e 2004 **ne chom nemet lise prevez Gwengamp**. Lamet eo bet ar brezhoneg eus ar pevar skolaj prevez da lavaret eo war-dro 100 skoliad ne c'hallont ket kaout kentelioù ken : e Bear, Pontrev, Lanrodeg hag e Gwengamp (ma oa bet digoret un hentad divyezhek e 2007 koulskoude).




Tridiforc'h bras zo. War dachenn an douaroniezh : evel evit ar c'helenn divyezhek e chom diaes deskiñ brezhoneg e reter ar vro : estreget e skolaj publik Plouha n'eus kinnig ebet. E-keñver hentad emañ tost an holl zeskidi er skolioù publik bremañ, ar pezh na oa ket gwir e 2004 pa oa ur c'hard eus ar skolidi er skolidoù prevez. **Un digempouez** bras zo etre ar skolioù publik ha prevez, ar pezh n'eus ket er broioù all dre-vras (dasparzh deskidi an eil derez zo heñvel ouzh dasparzh ar boblañs skol dre-vras : 60% er skolioù publik ha 40 % er skolioù prevez). E-keñver live ivez ez eus un troc'h etre ar skolaj hag al lise p'emañ ouzhpenn ar peder fempvedenn eus ar skolidi er skolaj

Tremenet eo an niver a skolidi a heuilh kentelioù brezhoneg en eil derez **eus 375 e 2004 da nebeutoc'h eget 300 e 2009. War gil eo aet ar c'helenn brezhoneg er skolioù prevez dreist-holl.**


Er pempvet renk emañ ar vro, just a-raok bro Treger-ha-Goueloù.

## Emdroadur sifroù ar c'heleñn brezhoneg en eil derez



Paouezet eo an digresk e 2007. N'eo ket bet ken bras an digresk hag e broioù all evel hini Treger-ha-Goueloù etre 2004 ha 2009, da skouer. Ha pa vefe nebeutoc'h a skolidi e 2009 eget e 2004 ez eus muioc'h a skolidi er vro eget e bro Treger-ha-Goueloù pa oa heñvel ar sifroù en div vro e 2004.


## Skolidi eil derez bro Gwengamp



Dont a ra an digresk hollek eus an diskar drastus zo bet er c'heleñn prevez. Er skolioù publik eo stabil ar sifroù etre 2004 ha 2009, goude digresk bras 2005 ha 2006.

Stabil eo an niver a skolidi er skolioù publik, ur c'hresk zo e skolioù zo zoken (e Bear hag e Pontrev da skouer). **Diskouez a ra e c'haller diorren ar c'heleñn divyezhek :** bro Gwengamp zo unan eus ar broioù m'emañ ar goulenn deskiñ en e greñvañ.

## Dregantadoù a skolajidi a heuilh kentelioù brezhoneg er skolioù publik e 2009




Ouzhpenn 10 % eus ar skolajidi publik a heuilh kentelioù brezhoneg e 2009 (digemm eo o niver e-keñver 2004), kalz muioc'h eget e bro Treger-ha-Goueloù ha bro Brest. Un tamm uheloc'h eo ar feur el liseoù publik eget er broioù all, met chom a ra bihan c'hoazh.

Abalamour da feur ar c'heleñn prevez eo izeloc'h ar feur hollek : war-dro 5% eus ar skolidi eil derez a heuilh kentelioù brezhoneg e 2009. Chom a ra an dregantad-se un hanter uheloc'h eget e bro Treger-ha-Goueloù (2,5 %) hag kalz uheloc'h eget e Breizh a-bezh (1,2%) memes tra.

## An deskadurezh uhel

Abaoe 2001 e vez kinniget gant Skol-Veur Gatolik ar C'hornôg ur stummadur war ar micherioù brezhonek : eus ur strollad a 15 studier e 2001 eur tremenet da 4 studier e distro-skol 2009. Stummañ danvez kelennerien divyezhek evit ar skolioù katolik e oa ar pal kentañ met kalz tud all zo bet stummet. **Abaoe distro-skol 2008 ne c'hall ket studieren all dibab heuliañ kentelioù brezhoneg** Skol-Veur gatolik ar C'hornôg e Gwengamp






Nec'hus eo an emdroadur er blegenn a-vremañ : un diouer a gelennerien stummet zo er c'helenn divyezhek dre-vras, ha brasoc'h eo ar mank er skolioù prevez c'hoazh. Ar stummadurioù fonnus evel hini an UCO zo e-touez ar stummadurioù efedusañ koulskoude evit stummañ brezhonegerien (hag a c'hallfe mont da zanvez kelennerien).

E miz Genver 2010 ez eus bet lakaet war-sav ur stummadur all e Gwengamp, gant Stumdi ar wezh-mañ.

# Ar c'helenn d'an oadourien

Skolidi ar c'hentelioù-noz – Distro-skol 2009<sup>3</sup>




N'eus ket un troc'h kornôg-reter met kentoc'h norzh-su. An 10<sup>vet</sup> bro e-keñver an niver a dud er c'hentelioù-noz eo bro Gwengamp (11<sup>vet</sup> e 2003) : div wech nebeutoc'h a skolidi zo eget e bro Treger-ha-Goueloù.

Tri lec'h pennañ a gaver er vro hag eno emañ tost an div drederenn eus deskidi ar vro : Gwengamp gant Kreizenn Sevenadurel Gwengamp diazezet abaoe pell zo, Kalon Plouha, oberiant mat er vro, ha kentelioù Louergad. Kelenn a ra al Levrig e 5 lec'h diwar an 9 zo er vro. Bresk a-walc'h e chom an darn vrasañ eus al lec'hioù kelenn memes tra (deraouad ebet e Louergad da skouer).

Kreñvoc'h eo ar c'helenn d'an oadourien e K.K. Lannolon-Plouha eget e Gwengamp Kumuniezh m'eo dister ar c'helenn d'an dud deuet e gwirionez : war-dro 30 den a zesk brezhoneg dre gentelioù-noz er gumuniezh hepken. Teir gwech muioc'h a zeskidi zo e K.K. Pempoull p'eo kevatal poblañsoù an div gumuniezh-se. N'eus kinnig ebet er-maez eus Gwengamp ha n'eo ket niverus an niver a zeskidi e kêr **Gwengamp : muioc'h a zeskidi zo e Sant-Brieg (tost un hanter muioc'h) ha heñvel eo an niver anezho e Ploufragan da skouer.**

<sup>3</sup> Ar sifroù-se a gaver dre ar munud er stagadennoù p 59.

*Emdroadur an niver a dud deuet enskrivet er c'hentelioù-noz*




Emañ bro Gwengamp e-touez ar broioù m'eo kresket an niver a dud enskrivet er c'hentelioù-noz etre **2004-2009 (+38%)**, ar pezh n'eo ket gwir evit bro Gerne na bro an Oriant.

Kresk zo bet er c'hentelioù-noz e Gwengamp e distro-skol 2009 (graet gant Kreizenn Sevenadurel Gwengamp), peogwir ez eus bet digoret ur gentel ouzhpenn evit an deraouidi ha krouet ur gentel evit al live 3.

Bras eo levezon Al Levrig er vro war dachenn ar c'hentelioù-noz : bodañ a ra ar c'hentelioù-se ouzhpenn an hanter eus skolidi ar c'hentelioù-noz.

*An niver a stajidi er vro*



*Digreskiñ a ra an niver a stajidi er stajoù dibenn-sizhun abaoe 2007. Muioc'h a stajidi ur sizhunvezh zo bet stummet e 2008 eget e 2004 avat pa'z eus bet digresk e Breizh (-16% etre 2004 ha 2008 evit Breizh a-bezh, + 30% evit bro Gwengamp)*

An div drederenn eus ar stajidi a heuilh stajoù ur sizhunvezh. Bro Gwengamp eo an trede bro e-keñver an niver a stajidi (goude bro Gerne ha bro Brest).

Daou aozadur a ginnig stajoù : **Studi-ha-Dudi** ha **Kalon Plouha**. Gant Studi ha Dudi e vez tud a zeu eus an tu all da vevennoù ar vro: 90% eus stajidi an departamant zo stummet gant ar gevredigezh-se. E-touez an tri framm hag a stumm ar muiañ ar stajidi dre ar stajoù dibenn-sizhun emañ Studi ha Dudi, asambles gant Kentelioù an Noz ha Skol an Emsav. Met digresk zo gant ar stajoù dibenn-sizhun abaoe 2007/2008 hag eus stajoù daou zevezh eur tremenet da stajoù un devezh hepken. Chomet eo Ti ar C'hoadoù a-sav gant ar stajoù evit an oadourien.

Digoret ez eus bet ur **stummadur hir er vro** gant Stumdi e miz Genver 2010: 4 den a heuilh ar staj 6 miz evit ar strollad kentañ.

An div drederenn eus ar stajidi a heuilh stajoù ur sizhunvezh. Bro Gwengamp eo an trede bro e-keñver an niver a stajidi (goude bro Gerne ha bro Brest).

# Klozadur ar brezhoneg en deskadurezh

Un tamm dihun a weler er vro er bloavezhioù diwezhañ gant digoradurioù skolioù divyezhek endro. Morgousket e oa chomet ar vro, hep skol nevez ebet etre 1998 ha 2005. Deuet eo ar skolioù nevez-digoret da wir avat, da-heul **stourmoù ar gerent** dreist-holl (s.o digoradur Pleuzal da skouer) ha gant se n'eus netra evit ar poent a c'hall suraat e vo dalc'het da zigeriñ skolioù nevez er vro er bloavezhioù da zont.

War-raok eo aet ar vro dre vras, met bihanoc'h eo bet ar c'hresk enni eget e broioù all ha dont a ra ar braz eus ar c'hresk eus skolaj Diwan Plijidi. Ne denn ket da lañs diabarzh ar vro hepken neuze rak e tesach ar skolaj-se skolidi eus ar broioù all.

**Kalz a zale he deus tapet ar vro-mañ war bro Treger-ha-Goueloù** pa oa an eil a-live gant eben dek vloaz zo ha pa rankfe an trede bro e Breizh evit an niver a vrezhonegerien bezañ a-live gant ar re gentañ. Sac'het eo ar c'hresk e Gwengamp hag er gumuniezh-kumunioù pa ne gresk ket ken skol Pabu ha skol Diwan Gwengamp. Merket eo ar vro ivez gant an **digempouez zo etre ar reter hag ar c'hornôg**. N'eo ket aes deskiñ brezhoneg e reter ar vro er-maez eus Plouha, ma vez graet skol brezhoneg koulz d'ar vugale ha d'an dud deuet.

E-keñver doare kelenn e vank un tañva eus ar yezh er c'hentañ derez (un doare mat eo da ginnig d'an holl vugale hag e dalc'h ar strollegezhioù lec'hel emañ) ha **kentelioù brezhoneg en eil derez prevez, peuzsteuziet etre 2005 ha 2008**. Koulskoude eo bro Gwengamp unan eus ar broioù m'eo kreñv ar goulenn deskiñ e-touez an dud : emañ e-touez ar broioù m'emañ an **dragantadoù er skolajoù publik en o uhelañ**.

Emañ ivez e-touez ar broioù m'eo kresket **an niver a dud enskrivet er c'hentelioù-noz** etre 2004 ha 2009. Nec'hus eo emdroadur ar stummadur e Skol-Veur Gatolik ar C'hornôg. Seul bouezusoc'h eo digoradur stummadur hir Stumdi e miz Genver 2010.

Evit kempouezañ an traoù er vro e rankfe 500 yezher ampart ouzhpenn bezañ stummet bep bloaz gant an holl zoareoù kelenn. Ne dizher ket ar pal-se evit ar mare. Diwar an holl zoareoù zo e bro Gwengamp evit deskiñ brezhoneg e vrasjeder e vez stummet war-dro 85 yezher ouzhpenn well-wazh wazh bep bloaz. Pell emañ Yann diouzh e gazeg eta ha kalz strivoù zo d'ober evit tostaat d'ar c'hempouez an abretañ posupl. Ret eo mirout ar pal a oa bet lakaet e 2003 da gaout 1 300 skoliad divyezhek a-benn 2015. **Derc'hel gant ur c'hresk bloaziek par da geidenn ar vro etre 2007 ha 2009** pe un tamm brasoc'h (etre +10 ha +15%) zo ezhomm evit dont a-benn. Evit reiñ lañs endro d'ar vro ez eus ezhomm bras da **zigeriñ klasoù er c'hentañ derez** gant un eil lec'h publik e Gwengamp kumuniezh, un eil skol Diwan er vro, **ha klasoù el lise**. Ezhomm zo da adkempouezañ ar vro dre grouiñ skolioù er reter (Plouha, Plagad-Pleuloc'h) ha diorren er su d'an hent-tizh (Plouvagor da skouer).

A-bouez eo emouestl ar galloudoù foran evit disoc'hañ ha diorren ar c'helenn divyezhek er vro. Div skouer gontrol a c'hall reiñ brud d'an dra-se : skol Diwan ar Chapel-Nevez he deus ranket dilojañ evitkenderc'hel da vezañ ha raktres skol divyezhek Plouha lañset mat gant harp an ti-kêr a-du gant ar brezhoneg.

Un touell e vefe lakaat dazont ar yezh penn-da-benn war chouk ar skolidi divyezhek avat. Pep rummad oad en deus da gemer e lod. Splann eo neuze ez eus ezhomm da gas war-raok an doareoù all da zeskiñ brezhoneg er skol hag e-maez ar skol. Diorren ha brudañ anezho zo ret ober ivez, dreist-holl ar c'helenn d'an oadourien hag ar c'hentelioù en eil derez, anezho an doareoù efedusañ da stummañ yezherien, e diavaez ar c'helenn divyezhek.

# Preder ar bed foran

## Oberourien ar politikerezh yezh er vro

Atebegezh meur a strollegezh tiriadel eo merañ ar yezh e bro Gwengamp, p'emañ ar barregezhioù evit kas ur politikerezh yezh da benn en tiriad e dalc'h meur a strollegezh tiriadel. Bras eo barregezhioù ar strollegezhioù tiriadel lec'hel (Rannvro, Departamant, DPKE<sup>4</sup>, kumunioù) gant pennaenn bennaenn ar frankiz d'en em verañ zo gant ar strollegezhioù tiriadel.

- **Rannvro Breizh** zo karget da sevel ha kempenn al liseoù, an treuzdougen, an aveadurioù bras, an touristerezh, ar stummañ. Roet he doa lañs, e 2004, d'ur politikerezh tiriadel diazezet war ar broioù. Sinet ez eus bet kevratoù bro a-benn steuñvekaat politikerezhioù ar rannvro hervez an tiriad. Merket eo er stagadennoù d'ar c'hevratoù (degemeret e 2009-2010) e-touez ar pennaennoù e vo **talvoudekaet ha brudet yezhoù Breizh**.
- **Departamant Aodoù-an-Arvor** a ver an hentoù-departamant, frammoù foran sevenadurel evel kastell ar Roch-Ugu e Pleuzal. Ledan eo atebegzhioù ar strollegezh tiriadel-se en obererezh sokial evit an dud oadet da skouer pe evit ar vugale hag an treuzdougen.
- **An etrekumunelezhioù** : war ledanaat ez a tachenn galloudoù an etrekumunelezhioù ( an armerzh, an aveadurioù sevenadurel...). Merañ a ra Gwengamp Kumuniezh ar poull-neuial, ar skol-sonerezh da skouer.
- **Ar c'humunioù** : ledan eo barregezhioù ha galloudoù ar c'humunioù evit merañ o ziriad. Kroget o deus kumunioù zo da lakaat e plas **ur politikerezh yezh da dalvezout e bro Gwengamp**.

Gallout a ra nep strollegezh publik ober gant ar brezhoneg er vuhez foran. Gant al lezenn e vezer rediet da implijout ar galleg met aotreet eo implijout ur yezh all. Kreñvaet eo bet an dielfennadur-se eus an testennoù gant ar Vonreizh kemmet e miz Gouere 2008. Degemeret ez eus bet ur mellad gant ar Parlamant hag a anavez ar yezhoù rannvro : “Mellad 75-1. - *Ul lodenn eus glad Frañs eo ar yezhoù rannvroel* ».

<sup>4</sup> diazevadur publik a genlabour etrekumunel

## Stad an divyezhezh er panellerezh-hent

War an hentoù departamant da gentañ emañ ar brezhoneg er gweledva yezhel meret gant an departamant, met en ul lodenn eus ar vro hepken. Brasjediñ a ra renerezh hentoù an departamant ez eus 80% eus lodenn gornôg an departamant zo aveet gant panelloù divyezhek hiziv an deiz.

Aodoù-an-Arvor e oa bet an departamant kentañ o tivizout staliañ panelloù divyezhek war an hentoù meret gantañ e 1984. Da gentañ e oa bet staliet panelloù mont-tre ha mont er-maez eus ar c'humunioù. **War hentoù kornôg an departamant hepken** e oa bet divizet implij an divyezhezh d'ar mare-se, ar pezh n'en deus ket divizet departamant ar Mor-Bihan ober<sup>5</sup>. Adalek 1986 e oa bet divizet lakaat panelloù heñchañ. Kenderc'hel a ra an departamant da staliañ ur panellerezh heñchañ divyezhek pa vez digoret tammoù hent nevez pe pa vez erlec'hiet panelloù kozh. Mankoù a weler memes tra pa ne vez ket troet an holl venegoù a-wechoù.

Staliet ez eus panelloù brezhonek ivez gant servijoù an endro e takadoù natur zo da skouer. Met n'eus ket bet lakaet bep tro : n'eus panell vrezhonek ebet e koadoù departamant Avaogour nag e Koad Meur Lanrodeg da skouer. Ha pa vefe bet an departamant kentañ o kemer an diviz, Aodoù-an-Arvor en deus kollet e lañs war dachenn ar panellerezh-hent. Tremenet eo Penn-ar-Bed dirazañ p'eo deuet da vezañ an departamant ma weler ar muiañ a vrezhoneg war ar panelloù. A orin brezhonek eo anvioù tost holl gumunioù an departamant, neuze e vefe mat d'ar c'huzul-departamant astenn ar panellerezh er reter ha sistematekaat anezhañ dre ober gant ar brezhoneg evit ar panellerezh berrbad (ar panelloù melen) pe panelloù nevez en implij.

Estreget an departamant zo karget eus ar panellerezh er vro : panelloù divyezhek a vez lakaet gant kumunioù ivez (en un nebeud kumunioù evel Bear ha Plouvagor eo aet ar panellerezh divyezhek war-raok abaoe 2004). Dizingal eo an doare da ginnig an div yezh eus an eil strollegezh d'eben avat : ne vez ket heuliet bewezh an erbedadennoù da sevel ur panellerezh divyezhek kempouez hag a zoare evel a gaver e broioù all en Europa (Kembre pe Spagn da skouer). Mankout a ra standardoù boutin d'an holl strollegezhioù ha d'al liveoù disheñvel (kumun, DPKE, bro, departamant).

<sup>5</sup> Divizet en doa staliañ ur panellerezh-heñchañ divyezhek war e rouedad hentoù a-bezh e 2004.

# Politikerezh yezh an departamant

## Obererezh an departamant

Ur pennad-skrid e brezhoneg a gaver bep tro er c'hannadig miziek abaoe miz Gwengolo 2006. Paneve ar pennad-se e kazetenn an departamant ne vije tamm brezhoneg ebet war skoroù-kehentiñ an departamant. Unyezhek-rik eo al lec'hienn Genrouedad, da skouer. Perzh a gemer Armor TV e produerezh abadennoù Web noz avat (un abadenñ bep miz). Unyezhek eo al lec'hienn Wikiarmor ivez, da skouer.

E-maez hentoù kornôg an departamant e chom dister plas ar yezh alies. Krog eo an departamant da sevel tiez departamant evit tostaat e obererezh d'an dud. An hini kentañ zo bet digoret e Gwengamp. Met en tu all d'ur meneg bihan "Ti an departamant" n'eo ket divyezhek ar panneloù nag en diavaez nag en diabarzh. N'eus tamm brezhoneg ebet e Zoo nevez Tregonveur pe e savadurioù bras an departamant kennebeut (Kastell ar Roc'h Ugu, da skouer).

## Budjed KD 22 evit ar yezh

Ur font "skoazell d'ar sevenadur brezhonek ha gallaouek", stag ouzh budjed ar sevenadur, a vod oberoù Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor a denn d'ar yezh. Estreget ar brezhoneg a vez skoazellet gant ar font-se : sonerezh Breizh, dañsoù Breizh, festivalioù, h.a. An div drederenn eus ar font-se a ya da skoazellañ oberoù a denn d'ar brezhoneg war-eeun memes tra. Budjed bloaziek keitat an departamant gouestlet d'ar brezhoneg a sav da **300 000 euro bennak**.


Skoazellañ ha heuliañ obererezh ar bed kevredigezhel eo a vez graet gant an departamant dreist-holl. Ne laka ket oberoù a denn d'ar yezh da dalvezout evel ma ra departamant Penn-ar-Bed.

N'eus programm ebet gant ar c'huzul-departamant evel ar pezh a vez kaset da benn gant Penn-ar-Bed evit diorren an embann ha ledanaat ar c'hinnig levrioù evit ar re yaouank (Priz ar Yaouankiz). N'eus ket a bolitikerezh evit broudañ ar strollegezhioù lec'hel all da gemer ar yezh e kont er vuhez foran dre ur programm skoazell d'ar c'humunioù ha d'ar frammoù etrekumunel evit kas da benn studiadennoù war an anvioù-lec'h hag evit staliañ ur panellerezh divyezhek.

**Abaoe 2005 en deus divizet an departamant paouez da skoazellañ an aozadurioù na labouront ket war dachenn an departamant war-eeun.** Abalamour d'an diviz-se eo digresket an dispignoù roet d'an embann (-36%) da skouer, da lavaret eo e veze roet skoaziadennoù da diez-embann staliet er-maez eus an departamant (da Emgleo Breiz pe da Geit Vimp bev da skouer).



## Emdroadur dispignoù ar c'huzul-departamant evit ar yezh (e €)



Ur c'hresk zo bet gant an dispignoù graet evit ar brezhoneg gant an departamant (+30% etre 2004 ha 2009), dreist-holl evit an oberoù a denn d'ar c'helell, met abaoe 2007 e tigrask an dispignoù un tamm (-2% etre 2007 ha 2009).

Kresket e oa ar budjed e 2007, gant kresk Diwan c'hoazh ha gant ur stignad en deus talvezet da aozadurioù e bed ar brezhoneg : ar skoaziadennoù evit ar postoù labour kevredigezhel. Postoù labour zo bet skoazellet gant an departamant evit Ofis ar Brezhoneg , al Levrig, Stur ha Studi-ha-Dudi. Stabil eo budjed an departamant abaoe 2007. Bihan eo al lodenn eus budjed ar c'helell zo gouestlet d'ar c'helell d'an oadourien (6%).

Gant oberoù a denn d'ar c'helell ez a an tri c'hard eus budjed an departamant gouestlet d'ar yezh dre vras. Aet eo pouez ar c'helell war greñvaat er budjed e-keñver ar pezh a oa e 2004, pa oa an div drederenn eus budjed ar brezhoneg gouestlet da ved ar c'helell. An dra bennañ skoazellet gant an departamant eo ar skolioù Diwan : an tri c'hard eus ar budjed gouestlet d'ar c'helell a ya dezho (div drederenn da Ziwan Breizh hag un drederenn da skolaj Plijidi). Heuliet he deus ar skoaziadenn roet d'ar skolaj emdroadur an niver a skolajidi tamm pe damm ; stabil a-walc'h eo abaoe 2007 memes tra, daoust m'eo kresket kalz an niver a skolajidi koulskoude.

War dachenn ar c'helell, estreget lodenn Diwan, e vez skoazellet an embann dafar dreist-holl gant Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor dre an aozadur **TES** staliet e Sant-Brieg. Stabil eo ar sammad roet da dTES avat.


**Digresk bras zo bet war dachenn ar stummañ kelennerien** : kalz nebeutoc'h a yalc'hadoù a oa bet dasparzhet e 2008 eget na oa bet graet e 2004 (rannet eo bet an dispignoù-se dre 4). Abaoe 2004 n'eo ket uheloc'h yalc'had ar studierien a vez stummet evit dont da vezañ kelenner divyezhek eget yalc'hadoù ar studierien all, da lavaret eo **ne vez ket broudet ken an danvez kelennerien da zibab ar brezhoneg**. Disheñvel eo politikerezh Aodoù-an-Arvor diouzh diviz ar Rannvro he doa roet lañs d'ur stignad yalc'hadoù evit an danvez kelennerien (Skoazell) e miz Meurzh 2009. Mont a ra war-gil ha ne respont ket d'an ezhomm bras da stummañ kelennerien a weler e Breizh dre-vras.

Sikourioù frejoù-hent a ro ivez d'ar familhoù o deus bugale skoliataet er c'hentañ derez e diavaez o c'humun met ne vez ket kelaouet an holl familhoù. Gallout a reont tennañ

splet eus ur stignad n'eo ket bet soñjet evit ar c'helenn divyezhek hepken. Ne sell ket ar skoaziadennoù-se ouzh ar skolioù-mamm avat.

N'eo ket kresket nemeur an dispignoù evit an oberoù er-maez eus ar c'helenn. Kresket eo bet un disterañ ar budjed roet d'ar skingomz (daoust m'eo chomet digemm ar skoazell roet da RKB), dre skoaziadennoù krouet evit Stalig ha "Brudañ ha skignañ" evit ar raktres keleier boutin d'ar skingomzoù a gemer perzh e rouedad ar skingomzoù brezhonek (Arvorig FM, Radio Kerne, RKB ha RBG).

*Dispignoù bloaziek an departamantoù evit ar yezh dre annezad en euroioù*



*Kresket un tamm eo bet budjed ar yezh en departamant abaoe 2004 met **peder gwezh izeloc'h eget hini Penn-ar-Bed e chom.***

## Ar vro

Un implij arouezel a vez graet gant Strollad a laz foran (SLF)<sup>6</sup> bro Gwengamp c'hoazh, evel ur stumm divyezhek eus logo ar SLF

### Kevrat bro Gwengamp

Kevratoù liesvloaziek (evit ar prantad 2006-2012) a oa bet sinet gant ar broioù hag ar rannvro e 2006. Ganto e vez steuñvekaet politikerezhioù ar Rannvro hervez an tiriad. Tri goload a ya d'ober ar c'hevratoù bro. An eil goload («frammadurezh rannvroel/lec'hel») a denn da raktresoù kendivizet etre ar sinerien ; danvez ar C'hevratoù eo. Gallet o deus ar broioù ouzhpennañ raktresoù en ur implijout an trede goload («frammadurezh lec'hel») a denn da raktresoù n'int ket termenet en a-raok er c'hevratoù. An hent kinniget dezhe gant ar C'huzul-rannvro e oa evit harpañ raktresoù lec'hel a denn d'ar yezh (staliañ panneloù-

<sup>6</sup> Groupement d'intérêt public

heñchañ divyezhek, sevel klasoù pe skolioù divyezhek, h.a.). Prezidanted broioù Breizh a oa bet kelaouet eus an dra-se dre ul lizher gant Prezidant ar Rannvro e deroù 2008. Met n'o deus ket ar broioù, ha bro Gwengamp en o zouez, implijet kalz ar c'hallusted-se.

Embannet he deus Rannvro Breizh adarre he youl da lakaat ar broioù d'ober evit ar brezhoneg oc'h embann ur sturlevr pleustrek da ziorren ar brezhoneg hag ar gallaoueg e raktresoù ar c'hevratoù Rannvro/Bro. **Broudet eo ar broioù gant ar Rannvro, da ziorren ar yezh en o raktresoù.**

Ne oa ket bet meneget ar yezh e kevrat bro Gwengamp sinet e miz Du 2006. Met kroget eo ar broioù da adwelet ar c'hevratoù e 2009. Merket eo er stagadennoù e-touez ar pennaennoù e vo **talvoudekaet ha brudet yezhoù Breizh.**

E stagadenn kevrat bro Gwengamp (degemeret gant ar Rannvro e Genver 2010) eo meneget ar brezhoneg e tost an holl raktresoù (25 diwar 29). Merket eo e vo kemeret ar brezhoneg e kont er panellerezh dreist-holl. Gant ul lodenn anezho emañ e-touez an divizoù ret e tennfe ur rann eus ar raktres da talvoudekaat ar brezhoneg, da lavaret eo e vo arc'hantaouet ar raktres gant ar Rannvro gant ma vo divyezhek ar panellerezh.

Douget eo an darn vrasañ eus ar raktresoù-mañ gant frammoù etrekumunel : evel ti an Douristed e Benac'h douget gant K.K.Bro Benac'h, ur sal sport e Plijidi gant K.K.Boulvriag, ur raktres kempenn ur skol evit bezañ un ti degemrer evit ar vugale e Pontrev gant K.K. an Trev da skouer.

Kemeret eo ar yezh e kont e raktresoù zo eus ar stagadenn-se. Met, evit ar pep brasañ anezho n'eo ket merket ar brezhoneg evel un dra ret evit bezañ arc'hantaouet, evel ma c'hoarvez e bro Gerne pe e bro Treger-ha-Goueloù avat.


## Oberoù ar strollegezhioù lec'hel

Nebeut a draoù nevez zo bet war tachenn ar yezh gant ar frammoù etrekumunel abaoe 2004. Krog eo Gwengamp Kumuniezh da gemer ar yezh e kont en he raktresoù : dibabet ganti ober ul logo divyezhek e 2009. Ganti ez eus ur garta c'hrafek divyezhek war ar stern ivez.

Framm etrekumunel ebet n'en deus sinet Ya d'ar bezhoneg evit c'hoazh. Tre e-kichen bro Gwengamp, kumuniezh kumunioù Kreiz Treger he deus sinet Ya d'ar brezhoneg avat, war al live 2, goude bezañ degemeret al label 1añ. Muioc'h-mui a deuliadoù a vez meret gant ar strollegezhioù-se war-eeun koulskoude (aveadurioù-dudi, sport, degemer evit ar vugaligoù, ar glad).

### Ya d'ar brezhoneg

Broudañ oberourien ar vuhez sokial hag armerzhel d'ober traoù fetis evit ar yezh eo pal *Ya d'ar brezhoneg*. Roet e oa bet lañs dezhañ e 2001. Divizet e oa bet ober kemend-all gant ar c'humunioù e 2004 ha gant ar frammoù etrekumunel e 2006. Ent pleustrek e vez kinniget d'ar pennadurezhioù-kêr dibab en ur roll 40 ober ar re a vo sammet ganto. Diouzh emouestl ar gumun, diouzh an niver a oberoù asantet ganti ha goude ma vo bet gwiriet eo bet kaset da benn ar pezh a oa bet prometet ober e roer unan eus ar pevar live testeniekaat a ya d'ober ar c'houlzad-se. **Diazez ar politikerezhioù yezh lec'hel a fell da *Ya d'ar brezhoneg* bezañ e gwirionez.**



Ouzhpenn un drederenn eus annezidi ar vro zo o chom en ur gumun bet sinet Ya d'ar brezhoneg ganti. Pell a-dreñv da vro Brest, bro Gerne pe bro Treger-ha-Goueloù emañ bro Gwengamp koulz evit an niver a sinerien ha dregantad ar boblañs. Tostoc'h eo avat eus bro Montroulez, ur vro ma n'eus ket kalz a lañs er vuhez foran. Live izelañ ar garta zo bet dibabet gant tost an holl sinerien avat. Live 2 ar garta zo bet dibabet gant kêr Gwengamp e Here 2008 memes tra. Ur gumun hepken zo gant ul label : Benac'h. E teir c'humuniezh-kumunioù n'eus tamm siner ebet : K.K. an Trev, K.K. Boulvriag ha K.K. Kastellaodren-Plagad.

Gwengamp a oa ur gêr er penn a-raok er bloavezhioù 80. Bet eo ar gumun oberiant nemeti er vro betek sinadur Bear e 2004. Buan ez eo aet plas ar brezhoneg war-raok e Bear en daou vloaz diwezhañ pa ne oa netra er gumun-se a-raok 2007 war-bouez kentelioù er skolaj publik : ur vagouri, ur skol, pannelloù staliet, un heuliad eus ar c'houlzad en ti-kêr.

Lakaat ar yezh war wel er panellerezh-hent eo bet an efedoù kentañ da heul sinadurioù ar garta. Pannelloù divyezhek nevez zo bet staliet e Bear e 2006 hag e Plouvagor e 2008, da skouer. Krog eo kêr Gwengamp da gehentiñ en div yezh : pennad-stur, pedadennoù, lec'hienn-Genrouedad (n'eus nemet titloù ar rubrikennoù zo e brezhoneg avat). Divizoù a bouez zo bet kemeret gant ti-kêr Plouha evit kas ar brezhoneg war-raok. Emañ an ti-kêr o labourat war ur raktres skol divyezhek evit digeriñ en distro-skol 2010.

Daoust da se, n'eo ket gwellaet kalz endro yezhel bro Gwengamp e-keñver 2004. Araokadennoù zo da c'hounit war tachenn bed ar vugaligoù (kinnig un degemer e brezhoneg er magourioù), pe ar skolioù (skoazell ar strollegezhioù lec'hel evit digeriñ skolioù divyezhek), kreizennoù dudi ha mont pelloc'h en implij er vuhez foran (plakennoù straed (evit ar mare n'eus nemet e Gwengamp), aveadurioù bras, er c'hehentiñ, kinnig stummadurioù d'ar gargidi).

Evel ma vez un digempouez kornôg/reter er c'helenn e verzer un digempouez Norzh/Su er vro. **N'eus tost lec'h ebet d'ar brezhoneg er vuhez foran e su ar vro c'hoazh** : K.K. Boulvriag, al Leñv Kumuniezh. Nec'hus eo an digempouez-se hag an diouer a skolioù en div gumuniezh-se.

## Klozadur preder ar bed foran

Sammet eo muioc'h ar yezh gant ar strollegezhioù foran hiziv an deiz eget 5 bloaz zo. Met deuet eo dihun ar strollegezhioù diwezhatoc'h eget e broioù all evel bro Brest pe bro Treger-ha-Goueloù. Tapet he deus ar vro dale (evit Ya d'ar brezhoneg da skouer). Kregiñ a reer da welet disoc'h an dihun-se e Bear, e Plouha pe e Gwengamp.

Bet eo Aodoù-an-Arvor an departamant kentañ o lakaat brezhoneg war e banellerezh-hent, met dibaoe, n'eus ket bet lakaet e pleustr ur politikerezh treuz na palioù nevez. Er-maez eus ar panellerezh-hent eo unyezhek ar panneloù all staliet gant an departamant (Kastell ar Roc'h Ugu, Ti an departamant, Koad Avaogour ha Koad Meur). Bevennet eo chomet an divyezhegezh da lodenn kornôg an departamant ha d'ul lodenn eus ar vro hepken (padal, er Mor-Bihan, e sell ar panneloù divyezhek ouzh an departamant a-bezh abaoe diviz Du 2004). Koulskoude en deus kadarnaet ar sontadeg kaset da benn gant TMO Région diwar atiz Fañch Broudig, emañ a-du an dud gant ar panellerezh-hent divyezhek e Breizh : 74% eus an dud zo a-du gant ar panellerezh divyezhek e Breizh-Uhel.

Nebeut a cheñchamantoù a verzer eus tu ar frammoù etrekumunel e-keñver ar pezh a oa e 2004. Gallout a reont kaout ur gwir levezon evit ar pezh a denn da gas ar brezhoneg war-raok. Implijout ar stagadenn da gevrat bro Gwengamp a c'hallont ober ivez.

Betek sinadur Ya d'ar brezhoneg gant Bear e 2004 ne oa nemet ur gumun oberiant er vro : Gwengamp bet e penn a-raok e Breizh, er bloavezhioù 80. Tamm-ha-tamm e krog ar c'humunioù da sammañ teuliad ar yezh, muioc'h-mui e Bear, e Plouha, e Plouvagor. Dre vras eo liammet ar braz eus oberoù an tiez-kêr gant ar panellerezh. Araokadennoù a chom d'ober war dachenn implij ar yezh en darempredoù gant an dud, evel degemer anezho e brezhoneg, ar pezh a dalvez e ranker diorren ar stummadurioù evit an implijidi.

En eneb, chom a ra kornioù-bro ma n'eo ket gwall oberiant an tiez-kêr c'hoazh, dreist-holl e su ar vro (da lavaret eo su an hent-tizh). **Dale** zo gant ar galloudoù foran evit kemer ar brezhoneg e kont er vuhez foran **e-keñver bro Treger-ha-Goueloù**. Ul liamm zo etre an dale-se hag an hini merzet er c'helenn divyezhek.

# Ober gant ar brezhoneg er gevredigezh

## Treuzkas ar yezh

E 2005 e roe lañs Kuzul-departamant Penn-ar-Bed d'ar genstrivadeg Klaskerien ha Treizherien Soñjoù, evit ar skolioù. E 2008 ha 2009 o deus aozet kevredigezhioù Al Levrig hag an UGB ar memes kenstrivadeg war dachenn Treger-Goueloù. Pal ar genstrivadeg-se zo adskoulmañ liammoù etre ar rummadoù ha lakaat an nevezvrezhonegerien da gaout divizoù gant ar vrezhonegerien a-vihanik. Reiñ a ra an dra-se an tu da dreuzkas pinvidigezh ar brezhoneg d'ar vugale ha d'an oadourien a zesk ar yezh. Evit ar vrezhonegerien a-vihanik e talvoudeka o yezh vamm.

## Servijoù d'an dud

War dachenn ar servijoù d'an dud war an oad n'hon eus renablet **ober ebet** evit ar mare. Gwall dreut eo plas ar brezhoneg er metoù-se er vro evel er broioù all, war bouez e bro Gerne (unan eus ar broioù nemeto ma vez oberoù a sell ouzh ar re oadet pe ar re glañv). Kresket eo poblañs ar skolidi divyezhek er vro c'hoazh abaoe 2004 ivez. Gant an emdroadur-se e vez degaset ezhommoù nevez. Dont a ra war wel un ezhomm da stummañ tud a-vicher e bed ar yec'hed (evel ortofonourien da skouer) evit respont d'ar mankoù zo er vro hag e Breizh dre-vras.

## Bed ar vugaligoù

Divizet he deus ar gevredigezh **Ti Poupigoù** degas ar brezhoneg en he magouri, e Bear. E-touez ar 6 lec'h degemer zo e Breizh hag o deus sinet Karta Divskouarn emañ. Ur benveg eo a vez lakaet e pleustr evit brudañ ha kas ar yezh war-raok er magourioù abaoe diskar-amzer 2007. Ul label a c'hall bezañ roet d'ar magourioù – live 1, 2 pe 3 – diouzh plas ar yezh en darempredoù gant ar vugaligoù. Enfredet ez eus bet ur renerez vrezhonegerez e diskar amzer 2007 ha sinet e oa bet ar garta e miz C'hwevrer 2008. 40 bugel a vez degemeret er vagouri-se hag a zo an hini gentañ hag an hini nemeti en departamant oc'h ober **ul labour kizidikaat ouzh ar brezhoneg**.

N'eus ti-kêr ebet, bet sinet Ya d'ar brezhoneg gantañ, en dije dibabet an ober a denn da skoazellañ evit sevel ur vagouri vrezhonek da skouer. Skoazellet eo magouri Bear gant K.K.Bro Bear ha gant Kumuniezh-Kumunioù Kreiz Treger (hag a drugarez dezhi e oa bet enfredet ur renerez vrezhonegerez).

## Dudi

## Dudi evit ar vugale

**Aet eo war-raok** an dudi kinniget er vro abaoe an diagnostik kentañ. Muioc'h a greizennoù vakañsoù a vez aozet hiziv an deiz eget e 2004. Pevarc'hementet eo bet an niver a



vugale zo bet er stajoù-se etre 2004 ha 2009. **Unan eus emdroadurioù a bouez an diagnostik eo hag unan eus tuioù kreñv ar vro ivez.**


*Kinnig dudi d'ar vugale – Bloavezh-skol 2009/ 2010*



*E su ar vro emañ an obererezhioù dudi evit ar vugale, n'eus kinnig ebet er gumun pe er gumuniez-h-kumunioù a skoliata ar muiañ a skolidi divyezhek : Gwengamp-kumuniezh. Lakaat a ra ar gartenn war wel an dislavar zo etre pouez su ar vro evit an dudi kinniget d'ar vugale hag ezvezañs ar c'helenn en tiriad-se eus ar vro. Er maez eus an oberezhioù kinniget gant an div greizenn n'eus ket kalz a obererezhioù dudi kinniget er vro (n'eus bet renablet nemet unan)..*

Daou framm a ginnig stajoù vakañsoù er vro : **Ti ar C'hoadoù** er Chapel-Nevez ha **Studi-ha-Dudi** e Plijidi hag a ginnig vakañsoù evit ar vugale abaoe 2007. 6 sizhunvezh zo bet aozet gant ar frammoù-mañ e-kerzh 2009 (pa ne oa nemet 2 e 2005). Estreget bugale ar vro a vez degemeret gant ar c'hreizennoù-se gant an diouer a ginnig zo er broioù all.

## An niver a vugale bet er c'hreizennoù vakañsoù



Aet eo kalz war-raok abaoe pemp bloaz, ur vro skouer eo war dachenn an dudi evit ar vugale.

**170 bugel** o deus heuliet ar stajoù-se e 2009, da lavaret eo **ur bempvedenn eus an holl vugale bet o vakañsiñ e brezhoneg e Breizh**. An darn vrasañ eus ar vakañsoù-se zo aozet evit bugale etre 6 ha 12 vloaz. Aozet e oa bet ur staj sevenadur Hip hop evit ar grennarded (12-16 vloaz) e Ti ar c'hoadoù memes tra. A bouez eo kinnig obererezhioù a ya en tu all d'an obererezhioù hengounel. Bro Gwengamp eo an eil bro hag a zegemer ar muiañ a vugale, goude bro Brest : an degemer bugale, hag a zo un dra a bouez evit ma vo ar vrezhonegerien yaouank en o bleud gant ar yezh er gevredigezh, zo unan eus tuioù kreñv ar vro. Ti ar C'hoadoù eo an eil framm e Breizh evit an niver a vugale degemeret, goude an Oaled.

**Ti ar C'hoadoù a zegemer klasoù-natur ivez** (war tem an endro hag an diorren padus dreist-holl) war an amzer skol. A-hed ar bloaz e vez degemeret klasoù divyezhek er greizenn. 10 klas oa bet degemeret e 2009 da skouer, da lavaret eo un drederenn eus hollad ar c'hlasoù degemeret ganto.

Ul lec'h degemer all zo bet renablet hag a c'hall degemer bugale e brezhoneg : Ti-feurm pedagogel Gwerduel Pont-Melvez. Krog eo da zegemer skolioù divyezhek gant ar youl da ziorren an obererezh-se.

Met **mankout a ra c'hoazh er vro ur greizenn da ginnig obererezhioù sizhuniek e brezhoneg**. Un ezhomm zo er vro dre ma'z eus 620 skoliad divyezhek.

Ur strollad-c'hoariva a zo bet krouet gant skolajidi Diwan Plijidi. Kroget o deus gant ar sevel pezhioù-c'hoari berr evit ar skingomz. Ar pezhioù-c'hoari kinniget zo da gentañ sketchoù evit kinnig troioù-lavar e brezhoneg. Kemer a reont perzh en abadenn Radio Kreiz Breizh krouet e 2008 "*Lankoned, kanfarded, c'hwiled*" ha savet gant skolidi ha skolaerien ar vro.



## Arvestoù ha gouelioù evit ar vugale

Abaoe 2004 e vez aozet gant **Daoulagad Breizh** troiadoù filmoù bevaat advouezhiet e brezhoneg gant **Dizale** evit ar vugale. Ur c'henlabour zo etre Daoulagad Breizh ha kevredigezhioù lec'hel evit aozañ an abadennoù : kenaozet e vez gant **al Levrig** er vro evit an niver a vugale degemeret. 3 skol diwar 7 skol ar vro o doa kemeret perzh en droiad-se aozet e 2009. **150 skoliad** o doa kemeret perzh en droiad er bloaz-se da lavaret eo **un drederenn eus skolidi ar vro hepken** pa gemer perzh tost div drederenn eus holl skolidi divyezhek Breizh.

## Dudi evit an oadourien

Lusket eo ar vuhez sevenadurel er vro gant ar bed kevredigezhel, dreist-holl gant ar c'hevredigezhioù a ginnig kentelioù d'an oadourien. Liammet eo strizh an obererezhioù dudi ouzh an deskiñ c'hoazh. Div gevredigezh zo oberiant evel e 2004 : **Kreizenn Sevenadurel Gwengamp ha Kalon Plouha**.

Darvoud pennañ ar vro evit ar pezh a denn d'ar vuhez sevenadurel brezhoneg eo **festival Digor** ma vez kinniget pezhioù-c'hoari, prezegenoù, beilhadegoù. Er-maez eus ar festival-se e chom treut ar c'hinnig abadennoù sevenadurel er vro. Aozañ a ra Kreizenn Gwengamp ur c'hafe brezhoneg sizhuniek abaoe distro-skol 2009, evit reiñ an tu d'an deskarded d'ober gant ar yezh. Aozañ a ra darvoudoù ur wech an amzer evel an nozvezh steredoniezh aozet e Plouha e 2008. Pourmenadennoù hag ar skrivadeg a vez aozet gant Kalon Plouha.

### ➤ Arvestoù ha gouelioù evit an dud deuet

N'eo ket stank an abadennoù sevenadurel brezhonek aozet er vro. N'eus strollad c'hoariva a vicher ebet enni da skouer, evel ma'z eus e bro Brest pe e bro Gerne da skouer. Reiñ a ra seurt strolladoù an tu da vodañ tud oberiant tro-dro d'ar c'hrouiñ e brezhoneg ha da vevañ er yezh.

Krog eo Daoulagad Breizh da aozañ abadennoù evit an dud deuet abaoe 2007 diwar skouer troiadoù an tresadennoù-bev met n'eus bet abadenn ebet aozet e bro Gwengamp c'hoazh.

War dachenn ar festivalioù eo **bihan plas ar brezhoneg** daoust m'eo bet sinet Ya d'ar brezhoneg gant Gouel Sant-Loup da skouer. Met ne ra ket kalz gant ar brezhoneg c'hoazh evel ma ra Gouel Kan ar Vartoloded e Pempoull, ar festival kentañ e Breizh hag en doa bet label an emglev Ya d'ar brezhoneg (label 1) hag a gas ul labour a-feson da benn. Brasañ kenstrivadeg dañsoù Breizh evit ar vugale, ha kalz anezho zo er c'hlasoù divyezhek, a vez aozet gant ar festival-se koulskoude. Un darvoud a zoare evit lakaat ar brezhoneg war wel e vefe. Arouzel eo plas ar brezhoneg c'hoazh er festivalioù dañs aozet er vro hag e Breizh dre-vras. Evel e diagnostik 2004 e c'haller menegiñ Dastum a aoz beilhadegoù ingal er vro

## Buhez speredel

Gant an Iliz e vez implijet ar brezhoneg a-wechoù diwar atiz hiniannoù. Lakaet eo ar yezh war wel dre lec'hienn Genrouedad an Eskopti Sant-Brieg ha Landreger, enni meur a bajenn vrezhonek ; graet e vez al labour-se gant ur bodad tud a-youl vat. Savet ez eus bet ul levr oferennoù divyezhek gant an Eskopti. Oferennoù a vez aozet ingal er vro : e kostez Gwengamp e vez un oferenenn vrezhonek bep miz. E Boulvriag e vez ur c'hantik brezhonek e pep oferenenn-Sul.



Dibaot-kaer eo an digareziou da gaout kelennadurezh war ar relijion gristen e brezhoneg hiziv an deiz. **Gwengamp zo unan eus an nebeud kumunioù e Breizh** ma vez kinniget **katekiz e brezhoneg** bep sizhun, evel e 2004. Heuliet e vez gant 6 bugel.

Hiziv an deiz n'eus koulz lavaret plas ebet evit ar brezhoneg er relijionoù er-maez eus ar gatoligiezh pe n'hon eus renablet tra ebet.

## An embann

N'emañ ket e-touez ar 7 bro ma kaver tiez-embann brezhoneg, ar vro nemeti eus Breizh-Izel ma ne vez ket embannet levrioù e brezhoneg ez eo.

## Ar mediaoù

### Ar c'hazetennoù

Abaoe 2009 e vez embannet bep sizhun ur pennad brezhonek e “L’Echo de l’Armor et de l’Argoat,” boutin d’an div sizhunieg all skignet e bro Treger-ha-Goueloù, “le Trégor” ha “la Presse d’Armor”. Abalamour d’an diouer a vrezhoneg er c’hazetennoù e oa bet roet lañs gant Al Levrig d’ur stourm evit kaout pennadoù brezhonek enno, dre ur sinadeg e deroù 2008. Disoc’het e oa bet e 2009 war pennadoù boutin d’an teir c’hazetenn e 2009 neuze. Titloù pep pajenn zo divyezhek en teir c’hazetenn ivez. Kenurzhiat eo gant Al Levrig hag a ver ur skipailhig tud a youl vat evit sevel ar pennadoù bep sizhun.

### Er skinwel

Abaoe 2004 eo koazhet kalz an niver a brogrammoù kinniget er vro hag e Breizh dre-vas gant fin an abadennoù brezhonek e TV Breizh (ne chom tamm brezhoneg ebet en o c’hael programmoù e 2008/2009).

#### ➤ France 3 Ouest

Degemer a ra bro Gwengamp holl abadennoù brezhonek France 3 Ouest. **Kinniget e vez 1 eur 50 a abadennoù brezhoneg bep sizhun**, da lavaret eo ur c’hardeur ouzhpenn eget e 2003/2004.

### Er skingomz


N’eus skingomz vrezhonek ebet staliet er vor. N’haller ket kennebeut resev abadennoù ur skingomz hollvrezhonek, da lavaret selaou brezhoneg a-hed an deiz, evel ma c’haller e bro Brest pe e bro Gerne. Met abadennoù brezhoneg a vez skignet er vro gant ar radio kevredigezhel Radio Kreiz-Breizh (staliet e Sant-Nigouden, gant ur frekañs e Gwengamp) ha France Bleu Breizh Izel. Tremenet eur eus 40 eurvezh a brogrammoù brezhonek e 2003-04 da **65 eurvezh** e 2009-10. An div drederenn eus ar programmoù-mañ a vez skignet gant RKB hag a skign kalz muioc’h a abadennoù brezhonek eget e 2004.



## Radio Kreiz Breizh

Troet eo kalz abadennoù RKB gant ar glad hag ar vrezhonegerien gozh. Evit mont muioc'h war-du ar grennarded he deus roet lañs ar skingomz d'un abadenn sevenet gant skolidi ar vro da skouer.

*An niver a abadennoù brezhonek skignet dre sizhun e Radio Kreiz Breizh-Kael 2009/2010*



Kresket eo an niver a brogrammoù skignet a-drugarez an eskemmoù abadennoù etre ar skingomzoù ezel eus ar rouedad Brudañ ha Skignañ ivez. Lañs zo bet roet d'un abadenn geleier boutin d'ar peder skingomz izili eus ar rouedad Brudañ ha Skignañ (a vod Arvorig FM, Radio Kerne, Radio Bro Gwened ha Radio Kreiz Breizh) e 2008.

## France Bleu Breizh-Izel

Goloet eo bro Gwengamp a-bezh gant abadennoù **France Bleu Breizh Izel**, anezhañ ar radio lec'hel selaouet ar muiañ. Kemmet eo ar programmoù brezhonek skignet war France Bleu Breizh-Izel e-keñver ar pezh a oa e 2004 : tennet ez eus bet un eurvezh en abadenn bemdeziek da lakaat un abadenn divyezhek en he flas. War-dro **13 eurvezh a brogrammoù brezhonek rik** a vez kinniget bep sizhun e kael programmoù 2009-2010 ha **20 eurvezh** ma kemerer **ar programmoù divyezhek e kont**.

## **War-du ur rouedad skingomz kevredigezhel e brezhoneg**

Evit ledanaat ar c'hinnig abadennoù brezhoneg e kenlabour ar skingomzoù kevredigezhel a ginnig abadennoù brezhonek : krouet o deus ur rouedad eskemm abadennoù. Aet eo an div skingomz hollvrezhonek, Arvorig FM ha Radio Kerne pell en aozadur ar rouedad-se : ouzhpenn eskemmañ programmoù e lakaont o barregezhioù e boutin ha kenbroduiñ a reont programmoù. Mont a ra ar c'henlabour-se en-dro gant ar gevredigezh **Brudañ ha skignañ**. Bodet eo ar pevar radio kevredigezhel lec'hel hag a eskemm o abadennoù kenetrezo er framm-se bremañ. Gant ar rouedad-se e vez savet keleier bemdez abaoe 2008 : ur gopräd eus pep hini eus ar 4 radio lec'hel a genlabour da sevel Keleier ar vro. Skoazellet eo ar postoù-labour-mañ gant ar C'huzul-rannvro

## An teknologiezhioù nevez o harpañ ar skingomz e brezhoneg

Aesoc'h eo deuet da vezañ selaou an abadennoù brezhonek gant ar Genrouedad. Gallout a reer selaou holl brogrammoù ar skingomzoù kevredigezhel FM war-eeun enlinenn dre al lec'hienn **Stalig** (abaoe miz Gwengolo 2004) ha dre **an Tour Tan** abaoe deroù 2005. Gallout a reer podskignañ abadennoù zo produet gant France Bleu Breizh-Izel pe Radio Kreiz Breizh.✕ Gallout a reer selaou Keleier Breizh enlinenn ivez war lec'hienn ar skingomz. Dale zo bet tapet gant ar brezhoneg e-keñver yezhoù all koulskoude. Gallout a ra ar yezh mont pelloc'h dre vras rak n'eus webradio ebet c'hoazh da skouer.

## Marc'had al labour e brezhoneg


E-kerzh nevezamzer 2006 e oa bet savet gant an Ofis un enklask war *Ar postoù-labour hag ar brezhoneg*. Tri goulenn a oa bet savet dreist-holl :

- stad an traoù d'ar 1<sup>añ</sup> a viz Genver 2006 (an niver a bostoù-labour a oa enno brezhonegerien evit implijoù hag a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg),
- ar pezh a c'hellfe bezañ (an niver a bostoù a vefe mat kaout brezhonegerien enno met zo tud divrezhonek enno),
- ar pezh a c'hellfe bezañ a-benn 2010.

Bewech ez eo an niver a bostoù-labour kevatal da implijoù leunamzer (KILA) zo bet goulennet ; kement-se a dalvez eo brasoc'h c'hoazh an niver a dud implijet, dre ma labour lod anezho darnamzer.

Gant **43 post-labour brezhonek** renablet e 2006 ez eo bro Gwengamp an 10<sup>vet</sup> **bro ma kaver ar muiañ a dud o labourat e brezhoneg. A-live gant bro Montroulez** emañ.

Kavout a reer **muioù a implijerien er-maez eus ar c'helenn divyezhek** eget e lec'h all e Breizh : Ti ar c'hoadoù, Studi-ha-Dudi, an UCO, Strollad a laz foran.




*Muioc'h a bostoù-labour zo er gennadoù er-maez eus ar c'helell eget e broioù all, bro Tregerha-Goueloù da skouer, na zegemer na magouri na kreizenn vakañsoù ebet da skouer.*

E diagnostik 2004 e oa bet ispriziet an niver a bostoù brezhonek er vro da 15 da lavaret eo e oa uheloc'h an niver a bostoù. Er-maez eus ar c'helell divyezhek n'eo ket emdroet kalz an niver a bostoù zo ezhome da gaout brezhonegerien warno. Un tamm kresket eo bet an niver a bostoù e-keñver 2006 er vro a-drugarez d'ar c'helell divyezhek. Gallout a reer brasjediñ ez eus 50 post KILA e 2010.

## An armerzh

E 2001 e oa bet roet lañs d'ar c'houlzad *Ya d'ar brezhoneg*. E Kerzu 2009 e oa bodet 654 a oberourien gevredigezhel hag armerzhel (hiniannoù ha frammoù nann-publik anezho) gant an Ofis en-dro d'un dra eeun : ober muioc'h gant ar brezhoneg war ar pemdez. Ur skoazell deknikel a vez roet d'ar sinerien, abaoe ar penn kentañ, evit harpañ anezho en o c'hoant da ziorren plas ar brezhoneg. Kinnig a ra an Ofis d'ar sinerien kas oberoù resis da benn evit mont war-zu ul label, e-giz ma vez graet gant ar strollegezhioù foran abaoe 2004. E 2007 eo bet ar preti **Ti ar C'hrampouezh** eus Benac'h ar **siner kentañ er vro o tegemer label 1 Ya d'ar brezhoneg**. Abaoe, an embregerezh **Abglenn** ha kevredigezhioù **Ti ar C'hoadoù** ha **Kreizenn Sevenadurel Gwengamp** o deus degemeret al label *Ya d'ar brezhoneg* ivez.




18 siner a oa e bro Gwengamp e miz Kerzu 2009. Nebeutoc'h eget e bro Sant-Brieg (24) pe bro Naoned (24) ha pell diouzh bro Kornôg Kreiz Breizh (75). Kresket eo e-keñver 2004 memes tra pa oa 11 siner er vro.

E 2009, e rummad embregerezhioù Prizioù dazont ar brezhoneg, hag a vez aozet bep bloaz gant Rannvro Breizh eo aet ar priz kentañ gant Abglenn, produer bio eus Pederneg hag en deus lakaet ar yezh e-kreizig kreiz e obererezh.

Skouer vat zo bet diskouezet gant un nebeud stalioù eus ar vro, evel Ekomarc'had Louergad, Netto Sant-Egantonn pe apotikerezh Pabu hag o deus lakaet panneloù divyezhek en o stal.

Dasparzh sinerien Ya d'ar brezhoneg dre rummad– Miz Kerzu 2009



*Tennañ a ra an dasparzh-mañ da hini Breizh : e bed an armerzh emañ ar brasañ niver eus sinerien Ya d'ar brezhoneg e bro Gwengamp.*

# Klozadur implij ar brezhoneg er gevredigezh keodedel

Gwellaet eo plas ar brezhoneg er gevredigezh keodedel er vro abaoe 2004. Hag en em dennañ a ra gwelloc'h eget broioù all, evel bro Treger-ha-Goueloù da skouer. E Bear emañ **ar vagouri gentañ eus an departamant** a zegas un tañva d'ar brezhoneg d'ar poupiged (n'eus nemet seizh e Breizh). Berzh a ra **ar c'hreizennoù vakañsoù** kinniget er vro. Daou framm bras a zegemer bugale e brezhoneg : **Ti ar C'hoadoù** hag en deus lieskementet an niver a gampoù aozet e-keñver 2004 ha **Studi ha Dudi** hag a ginnig abaoe 2007 sizhunvezhioù vakañsoù. A drugarez dezho e vez desachet bugale eus broioù all. Ar pezh a vank er vro eo kaout **un degemer sizhuniek** (da Verc'her da skouer) evit bastañ da ezhommoù ar vugale skoliataet er c'helenn divyezhek. Ezhomm zo er vro, evel e Breizh dre-vras, da ziorren an obererezhioù evit ar grennarded ivez.

Lusket eo ar vuhez sevenadurel gant ar bed kevredigezhel. Peurvuiñ eo liammet an dudi evit an oadourien gant an deskiñ : kinniget e vez obererezhioù brezhoneg gant ar frammoù kelenn dreist-holl. An oberoù war dachenn an dudi hag ar buheziñ evit an oadourien, zo chomet heñvel ouzh ar pezh a oant pemp bloaz zo. Evit respont da c'houlenn an dud ez eus ezhomm liesaat niver ha danvez an obererezhioù d'an dud deuet.

Kalz traoù a c'hall ober ar bed kevredigezhel e-unan. Met gallout a ra ar galloudoù publik lakaat da bal kinnig servijoù divyezhek d'an dud (digeriñ ur vagouri vrezhonek e Gwengamp-kumuniezh da skouer).



# Klozadur

Dale zo bet tapet en dek vloaz diwezhañ e diorren ar c'helenn divyezhek. Un dihun a verzer er bloavezhioù diwezhañ memes tra. Tuioù kreñv zo gant ar vro (an niver a yezherien, kreizennoù vakañsoù kinniget d'ar vugale, ...), met ret eo lakaat e pleustr politikerezhioù yezh lec'hel menetoc'h.

Dibarderioù bro Gwengamp evit ar brezhoneg

**Tuioù kreñv** zo gant bro Gwengamp : gant 17% a vrezhonegerien eo **an trede bro** e Breizh **ma vez komzet ar muiañ ar yezh**. Kêr bennañ ar vro, Gwengamp zo unan eus ar c'hêrioù kentañ he deus lakaet panneloù divyezhek e Breizh. **Kresket** eo an niver a dud enskrivet **er c'hentelioù-noz** etre 2004-2009. **Aet eo an dudi war raok** er pemp bloaz diwezhañ, an eil bro eo e-keñver ar vugale degemeret e brezhoneg er c'hampoù vakañsoù. E Bear emañ **magouri gentañ** an departamant oc'h ober gant ar yezh. Gallout a ra ar vro tennañ splet eus kevredigezhioù gwriennet mat.

Met en holl ne stummer ket trawalc'h a vrezhonegerien nevez evit kempouezañ koll ar yezherien. Brasjediñ a reer e vefe stummet war-dro 85 yezher ouzhpenn bep bloaz well-wazh. Evit kempouezañ ar c'holl da vat e bro Gwengamp e rankfe 500 yezher ampart ouzhpenn bezañ stummet bep bloaz gant an holl zoareoù kelenn. Ar pal kentañ da dizhout eo.

Met **n'eo ket bet cheñchet kalz tres ar vro abaoe 2003** war dachenn ar c'helenn ha **digempouez a chom er vro**, abaoe an diagnostik kentañ, etre ar reter hag ar su eus un tu ha peurrest ar vro eus un tu all. **Kalz a zale he deus tapet ar vro war bro Treger-ha-Goueloù ivez, pa oant a-live dek vloaz zo** (4 poent dilañs he deus ar vro). Heñvel eo emdroadur hollek ar vro ouzh emdroadur hini an departamant pa zlefe bezañ ul lusker. N'eo ket douget kresk hollek ar vro gant ar c'hentañ-derez met gant skolaj Diwan Plijidi. E Gwengamp eo chomet sac'het ar c'hresk. Ezhomm zo da genderc'hel da **astenn rouedad ar skolioù divyezhek** er c'hentañ derez ha reiñ an tu d'ar skolidi divyezhek da vont betek al lise ivez.

Evit mont war an tu-se, skoazell ar bed politikel zo hollbouezus, ouzhpenn hini ar bed kevredigezhel. Digoret eo bet al lec'hioù divyezhek diwezhañ a-drugarez da stourm ar gerent (Bear, Pleuzal). N'eo ket trawalc'h youl ar gerent evit dougen ur skol avat (s.o diloadeg skol Diwan ar Chapel-Nevez). Gwengamp, er penn a-raok er bloavezhioù 80, zo ebet ar gumun oberiant nemeti er vro betek sinadur Bear e 2004. Un adlañs a verzer er mare-mañ met **dale** zo e-keñver bro Treger-ha-Goueloù c'hoazh **koulz evit ar c'helenn hag ar vuhez foran**.

## Derc'hel soñj...

Sifroù pennañ ar brezhoneg e bro Gwengamp



## Ar vrezhonegerien

- War-dro 17% eus poblañs bro Gwengamp a oar brezhoneg e 2009 (e-tro 12 000 yezher).
- Tost da 5 000 yezher a vije aet d'an Anaon e bro Gwengamp etre 1999 ha 2009.

## Ar c'heleñn

- 1 150 den a zeske brezhoneg gant unan eus an doareoù deskiñ er vro e 2009.
- 3 skol nevez digoret er vro abaoe 2004 er c'hentañ derez hag 1 en eil derez.
- Nebeutoc'h eget ur gumun diwar bemp a ginnig ar c'heleñn divyezhek.
- E daou framm etrekumunel diwar 7 n'eus tamm kinnig divyezhek ebet : K.K. Lannolon-Plouha hag al Leñv Kumuniezh.
  - Gant 623 skoliad divyezhek e distro-skol 2009 eo bro Gwengamp an deket bro ma kaver ar muiañ a skolidi divyezhek.
    - un dilañs -25% e-keñver ar palioù bet lakaet en diagnostik kentañ (div wech gwashoc'h eget e bro Treger-ha-Goueloù da skouer).
    - 8<sup>vet</sup> bro eo e-keñver pouez ar c'heleñn divyezhek er c'hentañ derez gant 4,5% (8,2% gant bro Treger-ha-Goueloù).
    - Gant 11 % eus skolidi ar c'hentañ derez er c'heleñn divyezhek emañ Gwengamp Kumuniezh e-touez ar frammoù etrekumunel m'emañ en e uhelañ pouez ar c'heleñn divyezhek.
  - N'eus tañva ebet er c'hentañ derez
  - ar 5<sup>vet</sup> bro evit an niver a skolidi en eil derez (danvez dibab) : 297 skoliad en danvez dibab en eil derez e 2009 pa oant 340 e 2004 : er c'heleñn prevez ez eus bet un digresk bras er vro.
  - 4 studier a heuilh stummadur Skol-Veur Gatolik ar C'hornôg war ar brezhoneg en distro-skol 2009 (15 e 2004).
  - 150 den deuet zo enskrivet er c'hentelioù-noz er vro e distro-skol 2009.

## Ar vuhez foran

- Ouzhpenn un drederenn eus annezidi ar vro zo o chom en ur gumun bet sinet Ya d'ar brezhoneg ganti.
- 7 kumun bet sinet Ya d'ar Brezhoneg ganto hag unan gant ul label (Benac'h, live 1).

## Ar vuhez keodedel

- E Bear emañ magouri gentañ an departamant.
  - 170 bugel o deus kemeret er c'hreizennoù vakañsoù aozet er vro e 2009, 40 e oant e 2005.
  - 43,2 a bostoù-labour KILA brezhonek renablet gant an Ofis e 2006.
- 18 siner o deus sinet Ya d'ar brezhoneg, 4 anezho gant ul label

# Taolenn sintetek

Ar brezhoneg en deskadurezh			
Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> <li>Un dihun er bloavezhioù diwezhañ</li> <li>Berzh <b>skolaj Diwan Plijidi</b></li> <li><b>Dregantadoù</b> e-touez ar <b>re uhelañ er skolaioù publik</b> (kentelioù brezhoneg).</li> <li><b>Kresk</b> gant ar c'hentelioù-noz etre 2004 ha 2009.</li> <li>Digoret eo bet <b>stummadur hir Stumdi</b> e Genver 2010</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>Dale gant kresk ar skolioù e-keñver bro Treger-ha-Goueloù.</li> <li><b>Digempouez</b> ar c'hinnig etre kornôg ha reter ar vro.</li> <li>Sac'het ar c'hresk e Gwengamp</li> <li><b>Dilojadeg skol Diwan d'ar Chapel-Nevez e 2006.</b></li> <li>Ne gendalc'h ket ar c'helenn divyezhek <b>el lise.</b></li> <li>N'eo ket bet diorroet an tañva er c'hentañ derez.</li> <li><b>War ziskenn</b> ez a an niver a studieren stummet war ar brezhoneg e <b>Skol-Veur Gatolik ar C'hornôg.</b></li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>Diaesterioù zo atav evit <b>digeriñ skolioù divyezhek</b> nevez gant ar sistem zo bremañ (s.o Pleuzal).</li> <li>N'eo ket broudet ken an danvez kelennerien da zibab ar brezhoneg gant KD 22 abaoe 2004</li> <li>N'eus ket ur programm tañva er skolioù aozet gant KD 22.</li> <li>Diouer a skoazell a-berzh ti-kêr ar Chapel-Nevez evit degemer ar skol Diwan</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>Astenn rouedad ar skolioù divyezhek : digeriñ <b>un eil lec'hiad divyezhek publik e Gwengamp-kumuniezh</b>, krouiñ <b>un eil skol Diwan, kempouezañ ar vro en ur grouiñ skolioù er reter</b> (Plouha, Plagad-Pleuloc'h) ha diorren er su d'an hent-tizh (Plouvagor da skouer).</li> <li>Krouiñ an hentad divyezhek <b>el lise</b></li> <li><b>Reiñ un tañva</b> eus ar brezhoneg er skolioù</li> </ul>
Ar brezhoneg er vuhez foran			
Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> <li>Gwengamp : <b>unan eus</b> kêrioù <b>1<sup>añ</sup> Breizh bet o lakaat</b> panelloù <b>divyezhek</b></li> <li><b>Un drederenn eus annezidi</b> ar vro o chom en ur gumun bet sinet Ya d'ar brezhoneg ganto</li> <li>Politikerezh nevez gant tiez-kêr Bear ha Plouha</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>Strishaet eo divyezhegezh an departamant er c'hornog hepken</li> <li><b>Estreget war ar panelloù</b>, ne vez ket gwelet kalz a vrezhoneg (er c'hehentiñ, en degouezhioù ofisiel, en teulioù melestradurel, en degemer,...).</li> <li>N'eo ket kempouez an divyezhegezh atav.</li> <li>Panevet da banelloù an hentoù departamant ne vez ket gwelet ar yezh e kreisteiz ar vro</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>Diviz KD 22 e 1984 da chom <b>hep staliañ</b> ur panellerezh hent divyezhek <b>e reter</b> an departamant, ha neuze e reter ar vro.</li> <li><b>Paouezet eo</b> an departamant da skoazellañ ar frammoù a labour evit Breizh a-bezh ha n'int ket staliet en departamant.</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>An departamant : mont war-zu ur sistemategezh ha gwelaat an divyezhegezh kinniget.</li> <li>Lakaat ar <b>frammoù etrekumunel</b> da sammañ ar yezh (dre ar raktresoù a gaver e stagadenn ar <b>gevrat Rannvro-bro</b> da skouer)</li> <li><b>Kempouezañ ar vro</b> : Lakaat ar yezh war-wel e kumunioù kreisteiz ha reter ar vro.</li> </ul>

## Ar brezhoneg er vuhez keodedel

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ <b>Trede bro</b> evit feur ar vrezhonegerien er boblañs</li> <li>▪ <b>Magouri Bear</b> : an hini gentañ an departamant o skignañ ar yezh.</li> <li>▪ <b>Berzh ar c'hampoù vakañsoù</b></li> <li>▪ Gwriziennet mat eo ar c'hevredigezhioù</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ N'eus greizenn dudi ebet war ar sizhun.</li> <li>▪ An diouer a dudi evit ar grennarded.</li> <li>▪ Ar pep brasañ eus an obererezhioù kinniget d'an oadourien zo bevennet d'ar sevenadur hengounel</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ .</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Mont pelloc'h en implij ar yezh e magouri Bear</li> <li>▪ Digeriñ ur vagouri vrezhonek e Gwengamp-kumuniezh</li> <li>▪ Kaout ur greizenn dudi war ar sizhun e Gwengamp.</li> <li>▪ Liesaat niver ha danvez an obererezhioù d'an dud deuet</li> <li>▪ Kemer perzh en troiadoù aozet gant Daoulagad Breizh evit kinnig filmoù brezhonek er sinema</li> </ul>

# Stagadennoù

Sifroù ar c'heleñn divyezhek dre gumun ha dre live e bro Gwengamp –  
Distro-skol 2009

	Skol-vamm	Skol-gentañ	Skolaj	Lise	Hollad
Bear	38	13	0		51
Benac'h	21	17	0		38
Boulvriag	11	15	0		26
Gwengamp	64	82	41		187
Louergad	25	22	0		47
Pabu	41	44	0		85
Pleuzal	13	0	0		13
Plijidi	0	0	176		176
<b>Bro Gwengamp</b>	<b>213</b>	193	217	0	<b>623</b>

Sifroù ar c'heleñn divyezhek dre gumun ha dre hentad e bro Gwengamp –Distro-skol 2009

	Diwan	Hentad publik	Hentad prevez	Hollad
Bear	0	51	0	51
Benac'h	0	38	0	38
Boulvriag	0	0	26	26
Gwengamp	85	13	89	187
Louergad	0	47	0	47
Pabu	0	85	0	85
Pleuzal	0	13	0	13
Plijidi	176	0	0	176
<b>Bro Gwengamp</b>	261	247	115	<b>623</b>

Feurioù ar c'heleñn divyezhek dre gumun ha dre live e bro Gwengamp e 2008/2009

Kumun	Skol-vamm	Skol-gentañ	Ishollad kentañ derez	Skolaj	Lise	Hollad
Bear	10,8%	2,4%	5,9%			2,60%
Benac'h	33,9%	24,3%	28,5%			12,54%
Boulvriag	7,5%	10,1%	9,1%			5,43%
Gwengamp	18,4%	14,5%	15,9%	1,9%		4,09%
Louergad	18,2%	14,6%	16,1%			16,06%
Pabu	38,8%	28,5%	32,5%			32,46%
Plijidi	0%	0%	0%	100 <sup>7</sup> %		35,26%
<b>Bro Gwengamp</b>	<b>5,2 %</b>	<b>4,1 %</b>	<b>4,5%</b>	<b>3,6%</b>	<b>0%</b>	<b>3,8%</b>

<sup>7</sup> Skolaj nemetañ ar gumun eo hini Diwan.

*Feur ar c'helenn divyezhek dre gumun ha dre vloavezh er c'hentañ derez e bro Gwengamp*

	1999	2000	2001	2002	2003	2004	2005	2006	2007	2008
Bear	0	0	0	0	0	0	0	0	4,5%	5,9%
Benac'h	22,4%	24,1%	26,4%	22,0%	27,5%	27,8%	32,3%	29,8%	26,1%	28,5%
Boulvriag	0	0,0%	0,0%	0,0%	0,0%	0,0%	8,7%	8,7%	9,7%	9,1%
Gwengamp	10,8%	11,2%	12,5%	13,6%	15,5%	15,8%	14,3%	14,8%	15,2%	16,9%
Louergad	9,7%	10,5%	11,8%	17,9%	16,2%	16,1%	17,4%	16,9%	15,1%	16,1%
Pabu	33,6%	35,9%	32,7%	34,3%	33,5%	33,8%	36,4%	33,8%	32,5%	32,5%
<b>Bro Gwengamp</b>	<b>3,3%</b>	<b>3,5%</b>	<b>3,6%</b>	<b>3,7%</b>	<b>4,0%</b>	<b>4,0%</b>	<b>4,3%</b>	<b>4,2%</b>	<b>4,5%</b>	<b>4,5%</b>

*Sifroù ar c'hentelioù-noz dre gumun ha dre live e bro Gwengamp e 2009/2010*

	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4	Live 5	Hollad
Bear	10					<b>10</b>
Gwengamp	13	16	4			<b>33</b>
Kastellaodren			10			<b>10</b>
Lannolon		6				<b>6</b>
Louergad			10	8	7	<b>25</b>
Pañvrid-ar-Beskont					7	<b>7</b>
Plouha	8	4	6	6		<b>24</b>
Pontrev	11	8				<b>19</b>
Senven-Lehard		10				<b>10</b>
<b>Bro Gwengamp</b>	<b>42</b>	<b>44</b>	<b>30</b>	<b>14</b>	<b>14</b>	<b>144</b>

# Levrlennadur

- BAUDEQUIN I., Genver 2008. L'évolution de la population des 21 pays bretons de 1999 à 2005. Octant, Roazhon, 111, 17-21.
- BROUDIC Fañch, Meurzh 2009, Parler breton ay XXIe siècle, le nouveau sondage de TMO-Régions, Emgleo Breiz, 208 p.
- Contrat Région-Pays de Guingamp 2006-2012-Avenant 2009, 173 p.
- EBSSA (emb.), Gwengolo 2003. L'espace breton. Les dossiers d'Octant, Roazhon, 45, 152 p.
- GREF Breizh (emb.), Mezheven 2007. Tableau de bord emploi-formation par pays - Roazhon, 44 p.
- Ministrerezh an deskadurezh Stad (emb.), Ebrel 2008. Projet de programmes de l'école primaire. Pariz, 55 p.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2007. Ar brezhoneg e-kreiz ar roudour – Eil danevell hollek war stad ar brezhoneg. Roazhon, 135 p.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2004. Diagnostik war stad ar brezhoneg e bro Gwengamp. Roazhon, 24 p.
- UBAPAR, Ebrel 2009, Klasoù hag obererezhioù dizoleiñ /classes et activités de découverte en breton pour les scolaires
- UBAPAR, 2007 Kreizennoù vakañsoù hañv 2007/ séjours enfants et ados en breton Été 2007

# Mammennoù

- Al Levrig
- Bro Gwengamp
- Daoulagad Breizh
- Deskadurezh Stad
- Dihun
- Div Yezh
- Divskouarn
- Diwan
- Ensellerezh akademiezh Aodoù-an-Arvor
- Eskopti Sant-Brieg-Landreger
- France 3 Ouest
- France Bleu Breizh Izel
- GIP Bro Gwengamp
- Kalon Plouha
- Kreizenn Sevenadurel Vrezhon Gwengamp
- Radio Kreiz Breizh
- Rannvro Breizh
- Rektoriezh Roazhon
- Skol-Veur Gatolik ar C'hornôg
- Studi-ha-Dudi
- Stumdi
- Ti ar C'hoadoù
- UBAPAR